

Breizh Brevez

HAG ECHU EO D'AN IWERZONEG ?

J. ABASQ O VARVAILLAD

GAND EUR VAQUEZ EUZ AR GAELTACHT

HA GAND KELENNERIEN IWERZONEG

Dreo Koulouarn : Barzonegou

N° 80 - 1984

BRUD NEVEZ

Kelaouenn vrezoneg mizieg.

Niverenn 80

Miz kerzu 1984

Rener: Andreo Merser.
Sekretour: Jakez Salaun.

An oll lizerou ha skridou a zo da veza kaset da Brud Nevez, 6, ru Beaumarchais, 29200 Brest.

Priz an niverenn-mañ: 10 lur.

Koumanant bloaz:

- priz ordinal: 70 lur.
- koumanant-skoazell: azaleg 80 lur.
- broiou estrañjour: 100 lur.

Eur houmanant a dalv evid 10 niverenn.

Ar chekennou-bank a zo da veza kaset war-eeun da: Brud Nevez, 6, ru Beaumarchais, 29200 Brest.

Ar chekenou-post a zo da veza lakaet war K.R.P. « Brud Nevez » 893-94 P Roazon.

Ar houmananchou evid ar broiou estrañjour a zo da veza kaset, e arhant peb bro, da: Dawson-France, B.P. 40, 91121 Palaiseau Cedex France.

I.S.S.N.: 0399-7014.

C.P.P.A.P.: 34 627.

Disklêriet hervez al lezenn:

Moulet ez-prevez gand Brud Nevez.

C. evid an oll bennadou.

N'eus ket a aotre da adembann eur pennad euz Brud Nevez heb beza bet an aotre d'henn ober.

Ar skridou hag ar pennadou a vez embannet e Brud Nevez n'emaint ket da veza lakaet war gont ar gelaouenn heh-unan, war gont ar re o-deus skrivet anezo hebken. Ar skridou ne vint ket embannet a vo kaset endro ma vez tu.

Paeroniet e vez **Brud Nevez** gand **Emgleo Breiz**
Publié avec l'aide du **Centre National des Lettres**

Taolenn

↖ Dreo Koulouarn: Rorate, coeli, desuper.....	3
↖ Naig Rozmor: Letani d'an dour.....	5
↖ Youenn Brusk: Miserere.....	7
↖ Jeg: Droug-hirnez.....	8
↖ Visant 'n Askol: Welloh beza ki.....	9
↖ J. Abasq: O varvaillad gand eur vaouez euz ar Gaeltacht, Iwerzon.....	11
↖ J. Abasq: Pennad-kaoz gand kelennerien iwerzoneg.....	26
↖ Oaled Diwan.....	41
↖ Paotr Jeg: Deiz va zantifikad.....	47
↖ Yann-Loeiz Normand: Istor ar Habili. C'hwezegved pennad.....	53
↖ Charlez ar Gall: Rimadellou.....	56
↖ A. ar M.: Kinkladuriou on arrebeuri.....	57
↖ A. K.: Teñzor sonerez ar Vretoned.....	58
↖ Lizerou.....	59
↖ Taolenn al leoriou bet moulet e 1984.....	60

Bloavez mad a-benn 1985
da Iennerien Vrud Nevez!

Keuz

Da Lena.

Pa viot koz, daougrommet 'tal an tan,
Reud gand ar remm, ho soñj o nijal pell,
'Teuy eñvor doh 'oa tan e-barz ar zell
A daolen warnoh 'pad ne reeh van.

Er-mêz 'klevot eur vouez o vouskana ma han
Gand yaouankizou foll o tañsal war an hent,
Ar merhed aon gante da glevoud o fegement
'Vid boud 'tistrei d'ar gêr teir eurvez goude koan.

'Benn neuze vin-me êt a-bell 'zo d'ar purkater
Ha c'hwi e korn an oaled a-zevri gand ho pater,
Med keuz ganoh moarvad e donder kuz ho kalon
Da voud nahet gwechall ganin-me mond d'ar pardon.

Dreo Koulouarn.

Rorate, coeli, desuper...

O, Doue, me az ped, en amzer zakr an Azvent,
Da skuill eun nebeud koumoul en oabl an Etiopi,
Ra gouezo war an dezert 'vel er hantvedou kent
Ar gliz-noz 'vid o ezomm. Euz barr an neñv e hopi:
« Evit 'ta, ma zud-kêz, 'varvot ken war an hent!»

Pa ne vrein ket an had, hada ne dalv ar boan,
Er pri kaled d'an arar ne zigor ket an ervenn,
Hag heb glebor en erv ne hell ar gwiniz diwan.
Gand o naon ha sehed peleh ez ay ar bevier?
Na tamm na takenn ken. Bemde reont kov-moan.

Ra zeuy ar glao benniget eno da ziskenn puill,
Ma vo klevet endro kan ar wazig o ruill.
Neuze 'kano an oll 'vel o zadou eur salm:
« O feunteuniou hag oll a fiñv war an doureier,
« Meulit an Otrou Doue; skoom kreñv war an arem;
« Tennet 'n-eus 'vid E bobl an dour skler euz ar mên,
« Gloar d'an Tad, gloar d'ar Mab, d'ar Spered Glan. Amen!»

Miz kerdu 1984.

Dreo Koulouarn.

Letani d'an dour

Dour! O Dour!
Dour kenta
Dour beuz
Dour alouberez
Dour lugernuz ar ganevedenn
Dour eienenn a vuhez
Dour mammenn peb tra
Dour kavell ginivelez ha maro
Dour meurdezuz ar mor
Dour rouantelez ar pesked
Dour sklas ar menezioù
Dour balh ar froud
Dour hibouduz ar stêr.

Dour beo
Dour red
Dour red bepred
Dour poullig al loar
Dour kuz ar stivell
Dour teñzor ar goueleh
Dour gwerhez ar prajou
Dour bugelig glaoeier ebrel
Dour c'hwezenn an disheol
Dour priñsez he zeizenn arhant
Dour pokig d'an douar kraz
Dour rouanez yen ar puñs
Dour karedig ar podou pri.

Dour kevrinuz
Dour gallouduz
Dour madelezuz
Dour diskui ar perhirin
Dour pareouez an treid o wada
Dour douter uvernioù ar hlasker-bara
Dour flouradenn d'an daoulagad en abardaez
Dour frealzidigez an derzienn
Dour benniget treh d'an diaoul
Dour glan ar vadiziant
Dour burzuduz Massabiel
Dour nerzuz an absolvenn.

Dour aonuz
Dour touelluz
Dour gaouiadez
Dour teñval al lagenn
Dour laerez bugaligoù
Dour c'hwero an daelou
Dour repu an dizesper
Dour sebel ar peñsead
Dour anken ha spi an den
Dour koz ha bepred yaouank
Dour lusk peurbaduz ar bed
Dour va hastiz ha va delivrañs
Salud dit euz traoñ va bihanded
Dour! Dour! O Dour!

Naig Rozmor.

Mizerere

Truéz evid an heureuchin, èt da leh all da glask e voued, hag a
gejo gand an oto a-barz m'e-no treuzet an hent!
Truez evid ar vuzugenn kollet ganti he hent hag a zo o vond da
vervel war ar vein gwrezuz!
Truez evid ar paour-kéz o vervel gand an naon!
Truez evid an den a-neus poan sevel diouz taol gand ar hovad
a-neus grèt!
Truez evid ar plah truilenneg, mistr he horv, he hrohen rouz,
he zreid noaz, oh en em ruilla er raden, he haredig bewech dis-
heñvel!
Truez evid ar plah lard ha yah, prop ha kempenn, leun a hwez-
vad, o hortoz eur garantez a ne zeu morse!
Truez evid an amprevan drebet gand al labous!
Truez evid al labous a houzañvo an naon hag ar riou pa zeuio ar
goañv!
Truez evid an den mahet ha mezekaet. Evid an den a rank stoui
e benn, gouzañv an dizeeunded hag an taolioù!
Truez evid ar maher, trehuz hizio ha leun a lorh, a vo diskaret
warhoaz gand eur maher all evid beza mahet ha mezekaet d'e
dro!
Truez evid ar paour n'e-neus toenn ebed a-zioh e benn! Truez
evid an den pinvidig sammet gand an taillou war eun ti re vraz
evitañ!
Truez evid ar peskig o vervel war ribl ar stèr!
Truez evid ar pesketour ne oar ket petra ober gand ar re a bes-
ked a-neus paket!
Truez evid an hini a zu paper gand skridachou diboell!
Ha truez, ivez, evid an hini a lenn anezo!

Y. Brusk
21-11-1984



Droug-hirnez

Da noz an Nedeleg
E korn an oaled du
Ped kwech em-eus renket
Va botez 'tal 'l ludu?

Ped kwech n'em-eus kavet
E-barz ar chiminal
'N eur paper-seiz kuzet
Nemed eun aour-aval?

Korn an tan, azezet,
E huñvreal didu...
Va halon zo rannet
Gand eun droug-hirnez du.

Med perag huñvreal
E bloaveziou gwechall
Prestig e vo echu
Va zremen er hohu.

Jeg

Diwar « Le Combat ».

Welloh beza ki

Loullig e vammig kêz
'Nevo e galanna
War 'n oaled 'n e votez
'Vid an deiz kenta 'r bloaz.

Loullig a lipouzo
Evel ma ra beb bloaz
Madig ha lip-e-bao
Koavenn-lêz ha « Wiskas ».

Med e vammig 'vid 'r bloaz
Evid e blijadur
Da Nisa hello kas
He hiig bihan fur.

Eno Loull a gavo
Eun ti-debri 'vitañ
Bet savet 'barz ar vro
Evid ar wech kentañ.

Setu roll ar meuziou
A ginniger bemde
Da doud ar chasigou
Deut d'vale d'ar Hreiste.

Polizi, yer-Indez,
Pesked ha kig-bevin,
Piz-bihan, karotez,
Dibenn-pred divoutin.

Ha ma tap 'r skiderez,
Eul louzaouer-chatal
A soañgno ar paour-kêz,
En ti-debri, raktal.

Hag e-keid-se, Ali,
Ar paour-kêz Etiopian,
Heb bevañs ha heb ti,
Zo war e dremenvan.

Visant 'n Askol.

Diwar « Le Combat ».

O varvaillad gand eur vaouez euz ar Gaeltacht (Iwerzon)

Ballingearing zo eul leh dreist evid an Iwerzoneg.

Bez' eo?

Ya. Hag eh... emaoñ o paouez echui gand pemp kant studier bet o chom partoud dre al leh bihan-mañ... hag ez eont d'ar gêr gand eur bern... o veza gouest da gaozeal anezañ...

Ya...

Hag eh... ni 'blij an dra-ze deom ablamour... e reom... ni 'blij deom kêzeal anezañ gand ar vugale... hag e teuont evid o egzaminou... lod anezo a ra dre an iwerzoneg.

Egzaminou a-ratoz o-deus en iwerzoneg?

Hag o-deus. Egzaminou ispisial en iwerzoneg evid kaoud o zertifikad fin ar studi... bez' o-deus... bez' e teskont eur mell bern iwerzoneg e Ballingearing.

Pemp kant studier?

Pemp kant studier. Lod a zo lojet er skolaj, muioc'h e tiez...

Pe... pe oad e vefent?

Bez' e vefent azaleg deg vloaz betek triweh.

A ya!

War-dro.

A ya!

Paotred ha merhed.

Skol eil-derez, neuze.

Skol eil-derez. Just oh echui gand ar skol-stad e komañsont da zeg vloaz.

Aha!

Paotred ha merhed toueziet.

Ya.

Hag eh... ez eus tri rummad kenteliou disheñvel.

Ya.

O kregi azaleg miz even gand ar Vreudeur Gristen.

Hm! hm!

Hag e kemeront ar vugale a zo o paouez dilezel ar skol-stad a-raog mond d'ar skol eil-derez; hag eh... plij an dra-ze dezo, bez' e teuont endro amañ bloaz war-lerh bloaz.

Ya.

Bez' em-eus bugale a zo deut endro bremañ evid ar pevare pe ar pemved bloaz; komañset da zeg vloaz hag e kendalhont da zond endro evid ar vakañsou hag e teskont ar yez. Dond a reont euz Dublin, Cork, Watford...

Arhant evid adkempenn an tiez

Aya.

Euz Iwerzon a-bez.

Hag e karont o yez?

Kared a reont ar yez. Ya, kared a reont ar yez.

Unan bennag e-neus lavaret din... leun a dud o-deus lavaret din e teskont anezi er skol, ha n'o-deus tro ebed da gomz anezi goude-ze.

Ya.

Gwir eo?

Gwir eo. Ya, gwir eo. 'Hellont ket ober ganti ablamour o herent ne gomzont ket anezi.

Ya.

Hag... ar gerent a gas anezo amañ d'ar Gaeltacht evid ar vakañsou hag evid deski anezi.

Ya. Da zeski anezi.

Ya.

Eh... Daoust hag an dud a goze iwerzoneg eh... kenetrezo?

Ya.

Ya.

Dioustu ma'z eont kuit hag e teskont saozneg, pezh o-deus ezomm evel just.

Ya.

Ha ni a reseo arhant evid adkempenn on tiez digand ar Gaeltacht ablamour ma'z om familhou a gomz iwerzoneg.

Aha... C'hwi lavar, c'hwi 'pez arhant evid eh...

Evid eh... adkempenn ho ti, kea, er vro-Haeltach; o-dez muih a arhant eged n'ho-pefe en doare ordinal.

Evid eh...

Evid sikour ar re...

Evid sikour an dud ha...

Ya.

Gweled a ran; ne ouien ket an dra-ze.

Ya; setu e helloh adnevezi ho ti, lakom.

Dres.

Ho-pezh arhant evid an dra-ze hag...

Ya, ma ne helloh ket paea hoh-unan e sikourint ahanoh. Ya. Bez' o-deus c'hoant braz da zerhel ar yez beo.

Daremprejou ar vugale

Hag ar goueriated hag ar gomersanted, er rannvro, troet int ivez ouz ar yez?

Hag ez int. Bez' o-devez o lodenn arhant ivez.

Hm hm.

Ya. Dre m'emañt er vro-Haeltacht o-deus, evid ar ferm; adkempenn an tiez ferm hag...

Ya... Daoust hag an dud... setu, c'hwi eh... 'peus savet ho paotred en iwerzoneg?

Hag em-eus. Komañset o-deus azaleg o henta bloavez oad e komprenent Petra lavaren en iwerzoneg.

Ya, hag eh... er vro, daoust hag ar goueriated oll... A gomz...

A zao o bugale dre an iwerzoneg?

Hag e reont. Mez, kea, pa'z eont kuit ha pa'z eont d'ar skol e reont darempred... ma, darempred a rit gand bugale a zeu o zud amañ, ne houezont ket iwerzoneg ha setu neuze o bugale ne houezont ket ar yez.

Hmm

Setu, ez eo diñz evid ober darempred gand...

Ya.

Ober a reont darempred gand bugale hag e rankont kôzeal, hag hopezo ezomm euz ar zaozneg ivez, c'hwi oar.

Ya.

Red mad eo.

Ya...

Mez, pa vez ar vugale o c'hoari asamblez, daoust hag e c'hoariont en iwerzoneg pe e saozneg?

An daou.

An daou, ya.

An daou.

Ne reont ket forz?

Tra!

Ne reont ket forz pehini?

Nann! En em gompren a reont toud.

Hmm

Ya. C'hoari a reont en daou, hag o familhou a daol evez ma vefe kôzeet tamm saozneg ebed en tiez.

Ped ti e lavarfeh e vez kôzeet iwerzoneg enno?

Dre vraz, an hanter pe se.

Ya.

An hanter euz an niver.

An dra-ze a zo war-dro ped?

Lavarom, dre vraz, war-dro pemp kant.

Pemp kant...

Ti.

Tiez leh ma vez kôzeet iwerzoneg?

Ya.

Eun niver brao eo an dra-ze, kea?

Ya, bez'eo; eun niver brao eo.

C'hwi oar, en va bro-me, ar brasa euz an dud a gomz galleg d'o bugale.

Aha.

Kaoud a ra dezo ez eo gwelloc'h.

Ya.

Poenchou ouspenn en hoh egzaminou

Sevel uhelloc'h, sañset.

Hmm

Ganeom-ni e vez Frañsizion a deu amañ hag a vez nehet evid lavared Petra o-deus c'hoant ivez: kafe, te, eun dra bennag e-giz-se.

O ya!

Mez en em denna reont.

Mez, c'hwi oar, kompren a ran ahanoh pa gomzoh saozneg.

Hag e reoh.

Mez, roet em-eus sao d'eun den ha ne gêzee ket iwerzoneg.

Ya.

Lavaret 'n-eus ne houie tamm iwerzoneg ebed.

Ya.

Med ne hellen ket kompren e zaozneg kennebeud.

Ya, ne oa ket eun den euz ar hontre, douetuz.

Ma! bez' e oa euz hanter-hent diouz Bantry.

Hanter-hent diouz Bantry, gweled 'ran.

Mez lavaret 'n-eus, ne houie tamm iwerzoneg ebed.

Ya.

Mez, eh, ne hellen ket kompren e zaozneg.

Gweled 'ran.

Setu, ez eo tristig a-walh.

Ya.

Mad, er skol, daoust ha deski a reont o henteliou dre iwerzoneg pe dre zaozneg?

Iwerzoneg.

Dre iwerzoneg?

Ya. Tremen a reont o egzaminou en iwerzoneg, c'hwi oar, ar pez a anver ar sertifikad fin ar studi; gouzoud a rit petra ziniñ an dra-ze?

Ya.

Ya, e Bro-Zaoz eh anver an dra-ze... petra vez greet euz an dra-ze? ya...,level".

Ya, eh...ya...

Ya, eh... bez' o-devez poentchou ousspenn ma paseont anezañ en iwerzoneg.

Eur skolaj dirapar

O! hag o-devez?

Ya, bez' o-devez.

16

O!, an dra-ze zo...

Hm hm

Setu e teskont douaroniez ha jedoniez ha toud an dra-ze e...

Toud en iwerzoneg, beteg fin an amzer-skol amañ, en iwerzoneg.

Ar skol nevez-se aze?

Ya, hag e teuont diouz marteze tregont kilometr ahalenn evid deski o henteliou en iwerzoneg, ablamour o herent a felle dezo, bez' eo talvoudusoh evito...

O ya. Petra eo ar seurt ti-skol koz aze? Lavaret ez eus din e oa eur skolaj iwerzoneg.

Ya, bez' eo ar skolaj iwerzoneg, neuze, o-deus savet n'ouzon pegeid 'zo evid kregi gand an trimiziad kenteliou-se, c'hwi oar.

A ya.

E Balingary.

Bez' e-neus an êr da veza dirapar, n'eo ket?

Mad, n'eo ket e gwirionez. N'eo ket nevez, 'gav din, mez n'eo ket.

Aha!

Nann, n'eo ket, raparet eo, e gwirionez.

Ablamour, gwelet em-eus... prenezier torret warnañ.

Ma, setu, an dra-ze zo goude m'eo bet ar vugale o c'hoari bremañ en hañv, c'hwi oar, hag o-devez leun a blijadur gand ar „cailidh“, gouzoud a rit petra eo ar „cailidh“?

Ya.

Beb abardaez tud yaouank deuz... a zeu da veza eun tammig diroll, kea, o c'hoari football ha toud.

Aha!

C'hwi oar.

Al... petra eo „gailiz“?

„Cailidh“, „cailidh“: dañsal.

A! dañsal.
Bez' eo dañs Iwerzon.

A!
Ha muzik iwerzoneg.

A! ya.
Gweled a rit...

O ya! O ya! 'M-eus ket bet gwelet jamez mez... mad, gwelet 'm-eus bet e goueliou med... 'm-eus ket bet jamez gwelet an dud o tañsal o-unan.
Ya.

Ya, hag eh... an itron 'deus lavaret din, en iliz, veze greet toud en iwerzoneg.
En iwerzoneg; gwir eo, toud an overennou en iwerzoneg.

Ya... ha den ebed o klemm?
O! Klemm ebed!

Ar Bibl en iwerzoneg?

Klemm ebed?
Klemm ebed. Mond a reom d'an overn, eur wech e korv daouzeg miz pa'z eom kuit evid ar vakañsou e-pad eur penn-sizun, neuze e renkom mond d'an overn leh ma... vez lavaret e saozneg, ha ne hellom ket heulia.

Ne helloh ket heulia?
Tra, gouzoud a reom, sur a-walh, petra emañ oh ober, mez n'om ket gouest da respont.

Aha! A! ya.
Ablamour n'on-eus ket desket.

Ya, just eo...
Eur banne te 'zafe ganeoh?

Gand plijadur.
Ma tigasín deoh eur banne te, neuze.

Ya... Bez' e karjen mond endro da Vro-Hall gand eun doare Aviel iwerzoneg, daoust hag ez eus?
Petra 'fell deoh lavared gand eun Aviel iwerzoneg?

Eun Aviel en iwerzoneg.
C'hwi fell deoh lavared, an Aviel en overn.

Nann, ar Bibl en iwerzoneg.
Ar Bibl en iwerzoneg?

Daoust hag ez eus?
Ne gav ket din.

Ne gav ket deoh?
Tra.

Ablamour, gouzoud a rit, èsoh eo... re ziwezad eo evidon deski ar yez bremañ, med kompren a rafen.
Ya; gouzoud a rit eur ger bennag a iwerzoneg?

'Ran ket; o! eun nebeudig bennag hepken, gouzoud a ran „tigh“ hag eh.. petra huezan c'hoaz... nann, nebeud-kenañ a huezan.
Ya... Hoh ano?

Abasq.
Abasq.

A-B-A-S-Q- Jozef.
Jozef.

Ya. Hag hoh ano a zo?
Eh... O' Sullivan.

O' Sullivan. An dra-ze a zo eun ano iwerzoneg.
Ya; Maureen ni Hoolivan... Maureen ni Hoolivan.

An dra-ze eo en iwerzoneg?
Ya.

Maureen?
Ni Hoolivan.

Ni Hoolivan.
Ya.

Gwir?
Ya.

« Bez' ez eo eur yez kaer »

A! Ne houien ket an dra-ze... O.K.! Bez' e hellfeh kêzeal eun tammig en iwerzoneg?

Va Doue, sur ! (Eur frazenn en iwerzoneg).

An amzer a vez atao e-giz-mañ ganeoh?
Nann!

Respontit en iwerzoneg...
(Respont en iwerzoneg). Lavaret 'm-eus ema o kregi da hlepa.

Padoud a rey e-giz-se?
(Respont en iwerzoneg).

Ha, brao oa an amzer deh?
Kaer e oa (troet en iwerzoneg). Gweled a rit: kaer e oa (troet en iwerzoneg).

Er gêr ema ho pugale bremañ?
N'emaint ket. Eet int d'ar foar amañ hirio.

Ya, med respontit din en iwerzoneg.
Foar, c'hwi oar, loened ha micherious ha toud. Oll int eet d'ar foar.

Foar ar bloaz eo?
Foar ar bloaz, ya.

O! an dra-ze oa deuet da weled an den am-eus roet sao dezañ.
Gwir eo? Ya.

Kaoud a ra deoh e chomo an iwerzoneg beo?
O! Kaoud a ra din e rafe.

Kaoud a ra deoh...
Bez' e rafe; bez' e rafe, gwir.

Ya. Kalz tud a zeblant kared anezañ.
O! bez' eo eur yez kaer!

Hag ez eo?
Ya, bez' eo. Ni lavar toud or pedennoù en iwerzoneg; ni lavar or chapeled en iwerzoneg, hag eh... Ar vugale a en em gann, ha pa en em gannont eh en em gannont en iwerzoneg.

En iwerzoneg eh en em gannont?
En em ganna a reont en iwerzoneg. Ne houezont ket petra e vezont o lavared!

O! ya...
C'hwi oar...

Daoust hag ar person a zo... amañ bremañ, pe bez' ema e vakañsou?
Douetuz ema du-hont er foar er park, ya.

Ya...
Mez eun den „komifo“-kenañ eo da gêzeal gantañ.

Aha! Bez' e karjen kêzeal gantañ

....
Ya, bez' e leverer ema an iwerzoneg o tigriski ablamour ma'z a tud kuit euz ar Gaeltacht... An dra-ze eo ho sañtimant ivez?
Ma, mond a reont kuit ablamour e rankont hag... n'eus ket kalz a labour war-dro er Gaeltacht, n'eus ket a vicherious mad.

Ya, setu, kaoud 'rafe deoh ema o tigriski niver an dud a gomz iwerzoneg?
Ne lavarfen ket, nann.

Ne lavarfen ket?
Tra.

En hanter radio ...

Ha bez' ez eus kemend a dud o kêzeal iwerzoneg bremañ eged ma oa deg pe ugent vloaz 'zo?
Muioh, 'gav din.

Muioh?... Penaoz an dra-ze?
Kaoud a ra din ez int intereset muioh, kea, hag e hounezont muioh dreizañ hag o yez eo hag on-hini deom toud.

Hag e-keñver lodenn an iwerzoneg en televizion hag er radio...?
Bez' ez eus eun tamm brao aze ivez.

Bez' ho-peus eur radio iwerzoneg?
Ya.

Bemdez?
Ya.

Daoust hag e helloh lavared din pegementad amzer a vez lakeet d'an iwerzoneg bemdez?
Hm... Kredi 'ran ez eo ouspenn an hanter.

Ouspenn an hanter?
Ya; bez' ez eus, gwir.

An dra-ze zo war radio ar hontre, pe dre Iwerzon a-bez?
Dre Iwerzon a-bez.

Muioh eged an hanter...
Ya.

Euz an amzer a vez lakeet d'an iwerzoneg?
Ya.

O ya; O! an dra-ze a zo maread-kenañ. Gweled a rit, ni on-eus eun eur ar zizun e brezoneg hag eh... en Televizion, ar memez tra eo?
Ya; ma, muioh er radio eged en televizion.

Aha! ya. Bez' ho-peus peziou-c'hoari en iwerzoneg... en televizion?
Ya... euz bro Balingeary ez eont da Zublin, c'hwi oar, hag e c'hoari-

ont peziou iwerzoneg ha, beb tro, e-toare, e teu ar maout ganto hag an eil priz ha leun a briziou... beb bloaz.

Setu c'hwi zo kontant euz ar plas a zo roet d'an iwerzoneg?
Ya.

Er radio hag en televizion?
Ya, kredi a ran ez eo reiz-kenañ.

Reiz-kenañ?, ya.
Ya.

Hag ar rannyezou...

Daoust ha toud an dud en Iwerzon a gomz gand ar memez doare-distaga? pe bez' ez eus eun diferañs... etre an dud a gomz iwerzoneg?
Bez' ez eus, ya. Eun diferañs braz. Amañ e teu tud diouz ar Honn-mara hag e kêzeont eun iwerzoneg disheñvel diouz ma reom-ni.

Aha!
Beh o-deus o kompren ahanom.

Hag o-deus?
Hag o-deus... Ha ni on-eus beh o kompren anezo... Ni gred on-eus rêzon hag ind-i a gred o-deus rêzon.

Ya. Mez, dîez eo zoken en em gompren?
Ma, n'eo ket dîez-kenañ, mez, gweled a rit, distaga a reont disheñvel diouzom-ni.

Ya. Aha... bez' e hellfeh rei eur skwer bennag?
(Skwer en iwerzoneg).

Daoust hag o-deus geriou disheñvel ivez?
Hag o-deus; bez' o-deus geriou disheñvel ivez.

Ya... daoust hag ez eus geriou saozneg hag a deu e-touez hoh iwerzoneg?
...bez' e vefe...

Ha bez' e lavarfeh ivez ez eo livet ho saozneg gand ar yez iwerzoneg?
Douetuz ez eo, gwir.

Ober a rit gand geriou iwerzoneg pa gêzeoh saozneg?
Gwir eo, gwir eo.

Ne gavoh ket ar ger saozneg pe marteze ez eur kustum da ober gand ar ger iwerzoneg?

Ya.

Bez' e oa eun den ha e-neus diskouezet din... bez' e oa er Honnemara pe Donegall, 'm-eus ket soñj, diskouezet e-neus din eur falh, c'hwi oar, eur falh.

Ya.

Hag e-neus diskouezet din an troad, hag e-neus goulennet diganin petra oa ano an troad, hag em-eus lavaret eh... ma, eun dra evel „dorn“.
Dorn.

Ya... e brezoneg, gweled a rit, „dorn“ a ziniñi „the hand“.
Ya, „dorn“ a ziniñi ho torn-serr.

Eun dorn-serr?

Eun dorn-serr (Frazenn en iwerzoneg).

Aha! Petra eo eun dorn, neuze?

Ma lâmh.

Ma lâmh. An dra-ze zo heñvel ouz ar Hembraeg, eun tammig.
„Dorn“ a zo eun tamm euz ar falh, ivez. Bez' eo lod euz eun dra ben-nag er falh.

Ya. An dra ma krogoh ennañ er falh.

An dra e troher ar geot gantañ.

Nann, eun tann koad staget ouz an troad hir, hag e reont „dorn“ ane-zañ.

Ya, gwir eo.

Setu, e oan souezet.

Ya.

Daoust hag e hellfeh lenn...

Ne hellan ket, gwir, me 'm-eus poan o lenn, ablamour, 'vel ma lava-

24

ran, n'eo ket ar memez tra eged m'am-eus desket er skol.

Setu gwelloh ganeoh nompaz ober, marteze...
Gwelloh vefe ganen, ablamour...

Echu

Fañch Broudig

**Langue et littérature bretonnes
Bibliographie: 1973-1982**

Une vue d'ensemble de la production écrite concernant la langue et la littérature bretonnes depuis dix ans

Priz: 45 lur

Emile Ernault

**Geriadurig
Brezoneg-galleg**

Eil moulladur

Priz: 90 lur

Pennad-kaoz gand Kelennerien iwerzoneg

A – Ma leverom ez eo echu an iwerzoneg, leverit d'eun Iwerzonad ez eo echu gand an iwerzoneg, an dra-ze a zo ar gwella kred e vevo ar yez. Kaoud a ra din, atao. Ma leverit ez eo maro ar yez, an dra-ze a zigoro eun toull goullou en e spered hag e klasko leunia an toull goullou. Setu, m'ho-peus tud hag a lavaro ez eo maro ar yez, me gav din an dra-ze a zo sin vad; ablamour ez eo sin e teüio eur renevezenti e-touez an oll dud intereset; amañ hag e Balivoney, e peb leh. Ne gredan ket ez eo maro ar yez, ablamour ma kôzeoh gand an dud er gêriadenn-mañ, daoust ma kôzeint saozneg deoh, bez' e-neus an dra-ze ivez da ober gantañ, bez' ema kalz êsoh en iwerzoneg. Mez bez' e stagont – evel ma ra eur bern Iwerzoniz, ar yez iwerzoneg ouz an istor drement, hag a oa memez tra en o spered ha paourentez. C'hoant o-deus ankounac'haad ar baourentez.

Me – Setu e vezo tuet da glask ankounac'haad an iwerzoneg ivez...

A – Ya, rag an iwerzoneg a zo bet staget ouz ar baourentez; an dra-ze n'eo ket or faot, an dra-ze a zo eur fed istorel, douetuz; d'an nebeuta ma n'eo ket eur fed, e sao diouz fedou istorel.

B – Ya, a-du emañ ganeoh war an dra-ze; klevet em-eus eun istor diwar-benn unan bennag e Galway o tond e-barz eun davarn hag o klevet tud o kôzeal iwerzoneg, hag e oant gwisket brao... Bez' eo stag ouz ar baourentez, peizanted, « patois ». Ha neuze an dud a gôze iwerzoneg, o saozneg a zo tuet da veza « hiberno-saozneg ». Bez' ez int tuet da gaoud eur gramadeg fall... evel ar pezh a anvit « franglais ».

O frammadur a zo... a deu war-eün euz an iwerzoneg. Bez' e klaskont en em zizober euz an dra-ze, ar re zesketa anezo. Diêz-kenañ ez eo evito. Anaoud a ran eur famill hepken er bastell-vro hag a zo iwerzoneg naturel-rik dezo; evito e lavarfen ez eo an iwerzoneg o yez-vamm; tud hag o-defe da zisplega eun dra bennag tost d'o halon, tost-kenañ dezo da ziskloza, a rafe an dra-ze en iwerzoneg: hag an dra-ze eo, a gav din, ar mên-touch... Bez' ez eus eun dra kuriuz-kenañ am-eus gwelet e Konnemara; bez' o-deus eno eur zadornvez-abardaez en eul leh ma'z on bet alfez, hag an ton anezañ a zo izelloh eged ar pezh a zivinfeh, ne gaver netra nemed patatez fritet ha mezventi ha gwinegr... displijuz-kenañ, hag e vez ganto dañsou modern; diskotekaj modern a lavarfen, en iwerzoneg penn-da-benn. Al lazou-seni, ar hemennadou a vez greet e saozneg, e-pad an noz ar muzik a vez c'hoariet a zo muzik pop; med toud ar gaoz etre an dud o tañsal a zo en iwerzoneg. An dra-ze a zellfen outañ evel eur mod-beva didalvet, n'ouzon ket, med greet e vez en iwerzoneg. An dra-ze, en eur mod, a zislavar ar menoz e rankoh kaoud « ceiliadh » ha c'hoariou « hurling » ha c'hoariou football a-raog kaoud iwerzoneg. Bez' o-deus, sur, ar peb falla euz plijadurioù kêr, mez iwerzoneg gwirion eo. An dra-ze a zo bruderez fall, 'm-eus aon, mez...

Aon da veza klevet

A – Eur fed eo, ne heller ket tehoud diouz ar fedou. Memez tra, bez' ez eus eur rezon evid ar hwitadenn, ma'z eus eur hwitadenn, e-keñver ar yez, hag an dra-ze zo, ma seller ouz an ekonomiezh, ni a zo izelloh eged broiou evel Bro-Zaoz. Ar saozneg a zo bet en em ledet, 'gav din, ablamour d'ar holoniou. M'he-defe Iwerzon koloniou er memez doare, an iwerzoneg en em ledfe ivez. Ne hellom ket keveza war ar marhad ekonomeg, gand broiou braz evel Bro-Hall, Bro-Zaoz pe Bro-Alamagn; setu perag e kemer ar yezou-ze ar renk uhella e-keñver an iwerzoneg. Ma ne hellom ket keveza war ar marhad ekonomeg ne gav ket din e hellom keveza dre ar yez.

Bez' ez eus eur skoill all eneb ar yez iwerzoneg, hag an dra-ze a zo an aon on-eus dre natur da veza klevet; ne blij ket deom kôzeal, beza klevet. Lakom ez eus tri alaman en eun ostaleri; toud an dud a oar int Alamaned e-leh an Iwerzonad a zo tuet d'en em lakaad en eur horn da guzulikad, da gomz a vouez izel d'e vignoned. Bez' e kavit an dro-natur-ze. Bez' ez eo eur seurt lentidigez on-eus.

Me – Setu e lavarfeh n'eus ket kalz a dud hag o-defe eun emzalh naturel, dieub, e-keñver ar yez? Pe eh en em gannoh eviti, pe ho-peus méz anezi?

A – An dra-ze eo, ya.

C – Nebeud-kenañ a dud o-deus méz anezañ bremañ, koulskoude, 'gav din.

B – Memez tra, bez' ez eo eur yez vinorezel, n'eo ket?

C – Sur ez eo eur yez vinorezel, ha n'eus nemed eur vinorelez o komz anezi ez-naturel, c'hwi oar.

B – Ha neuze ma houlennoh digand an darn vras euz an Iwerzoniz daoust hag e karfent e varve, ne rafent ket. Mez ne reont netra war e dro.

Me – Mad, goulennet 'm-eus digand eun archer e Ballingearry hag e-neus respontet din an dud ne reent ket forz tu pe du, mez an darn-vrasa euz an dud am-eus goulennet diganto o-deus respontet o-doa fiziañs e chomfe beo.

A – Evel yez ez eo eur yez kaer. Klevet am-eus Gallaoued o lavared – daoust hag o-doa c'hoant ober plijadur din pe get, n'ouzon ket, mez lavared a reent e kavent Iwerzoniz o kôzeal galleg kalz sklêrroh eged ar Zaozon.

B – An dra-ze a hellfe dond euz levezon an Normaned e rannvroioù zo e Iwerzon. Ni lavar « garsoon » e Cork, evid eur paotr, e Munster ivez e lavarer « garsoon ».

A – Bez' ho-peus « garçon » e galleg, gweled a rit.

Komision ar gerioù nevez

B – Or gerioù a vicher ivez a deu euz ar galleg. Mez, n'ouzon ket... an iwerzoneg n'eo ket eur yez evid ar filozofiezh, n'eo ket eur yez evid ar reiz, an dud n'o-deus ket analizet o reiz amañ kalz, barzeg ha pemdezieg ez eo kentoh eged filozofieg. Bez' e seblantom kaoud eun diouer spontuz a herioù evid displega ar menoz, evid displega stadou

dizanzev ar menoz, a zo staget ouz ar vuhez a-vremañ, hag e ranker klask gerioù evito oll, hag an dud a zo ken nehet gand ar geriaoueg ma ne hellont ket soñjal.

Me – Petra vez greet war-dro emzilh ar vuhez a-vremañ a-barz ar yezoniezh, daoust hag e kemeret gerioù saozneg pe daoust hag ez eus eur gomision bennag hag a glask sevel gerioù iwerzoneg?

A – Bez' ez eus eur gomision. Bez' o-deus kemeret kalz poan evid trei gerioù tegneg, dreist-oll skianteg, er yez. Mez e-toare n'o-deus ket greet berz, bez' e vezer tuet da gemered ar ger saozneg.

B – Ha e lakeer eun distagadur iwerzoneg warnañ, hag eun dibenn-ger iwerzoneg.

Me – Me ne gav ket din ez eo fall, a-benn ar fin.

B – Nann, mez eun druez eo e vefe saozneg, c'hwi oar. (*C'hoarz*).

Beza mouget ganto

Me – A ya! C'hwi lavar ho-peus eur seurt droukrañs istorel bennag...

B – O ya, bez' e chom ar blaz fall ganeom, (*c'hoarz*), sur a-walh.

A – Evel just, an dra-ze a zigouez e galleg; c'hwi ho-peus ar « week-end », « le week-end ».

Me – Ya, mez bez' e-neus an êr da veza diouz ar hiz e galleg implij gerioù saozneg.

B – Mez an « Académie » a zo krenn a-eneb... C'hwi a hell kemered ar zaozneg war ar memez pazenn, ni a zo evel mouget gantañ; or zevenadurezh a-bez a zo dindan galloud ar zaozneg, saozneg an tele, ha dreist-oll amerikan. Sur on hoh hini-c'hwi a zo ivez, mez... O veza en eur stad ken gwan, ne hellom ket kendeuzi anezo en or yez. Bez' e rankom beza beuzet ganto. Pa oa kreñv a-walh ar yez iwerzoneg da zigemeret ar yez halleg en daouzegved kantved he-doa kendeuzet ar galleg enni. Estreged bremañ ne jom netra dirazom nemed beza mouget gand ar zaozneg pe an amerikaneg.

B – Bez' ez eo adarre eur gudenn a vruderez a gredan; ne lakom ket or mouez da veza klevet kreñv a-walh, pell a-walh. Ar Zaoz gand e vuzell-uz reud, a zo gouest « da redeg a-haoliad war gwagenn an enebiez », a lavarfen. Ni zo tuet da veza, evel ma lavarit,... da hortoz beza heñchet gand ar re uhel, da veza meulet ganto. Estreged broiou all o-deus bet meulet ahanom e-pad kantvejou; evel eur ouenn a dud o-neus lakeet or merk war ar gevredigez dre vraz. Pa vez keñstion euz or yez deom-ni ha divenn gwirioù or yez ez om tuet d'en em lakaad izel-kenañ, er hontrol euz ar Zaoz a n'e-neus ket a véz.

Me – Ya, mez eñ e-neus yez eun trehour, n'eus ket?

A – Gwir eo, med gweled a rit... Eun dra all hag a hoari eneb deom, dreist-oll ar yez iwerzoneg: ni fell deom kôzeal iwerzoneg dinamm. Ne reom ket a forz euz ar faziou a reom e saozneg.

B – Ni o-neus aon da zigeri or genou en iwerzoneg kenkaz...

Me – Bez' ho-peus kudenn ar hemmaduriou ha se...

B – Aon o-deus da ober faziou yezadur.

(Eun den all o tostaad).

B – Eun dra bennag 'pefe c'hoant lavared?

Me – Ni zo o kôzeal diwar-benn an iwerzoneg.

A – « Digaset e vezo evel testeni eneb deoh ma lavarit eun dra bennag »... *(C'hoarz).*

Me – Nann, prevez-striz eo *(c'hoarz)*. Ar merhed o-deus goulennet diganen ha dond a reen euz kevrenn an Deskadurez... Me zo euz Breiz.

B – O! 'lato! An dra-ze a ro eul liou disheñvel d'an traou.

D – Neuze ez oh eur breur kelt... Oh ober eun enklask war ar zaozneg pe war an iwerzoneg emaoñ?

Lavared « demad » ha « kenavo »

Me – O! me zo eur helenner war ar zaozneg, setu emaoñ o klask laza daou labous... O klask emaoñ keñveria stad an iwerzoneg ha stad ar brezoneg, c'hwí oar.

D – Poent an te eo; deuit da gemered eur banne te da genta hag e hellim kôzeal.

(E-pad an te: mern vihan, e-kreiz trouz al listri...)

B – Evid ar gouarnamant, ez-ofisiel, ez eo an iwerzoneg ar yez kenta; ha peb Iwerzonad e-neus ar gwir da veza desket dre e yez..., ha toud ar meskaj-ze. Hag ez eo red d'ar gelennerien skoliou-stad gouzoud iwerzoneg; taolet o-deus zoken er-mêz tud ha ne oant ket bet gouest da gaoud o aotreou ablamour e oant bet skoliet e Bro-Zaoz e derou ar Stad. Ha... ne reont nemed ober neuz... N'eus bet diviz ebed en iwerzoneg beteg-henn. Bez' emaint o hortoz anezañ (an iwerzoneg) da zavel diouz ar skoliou e-leh digas anezañ d'an traoñ. N'o-deus greet netra ebed. Rediet o-deus an dud a zo o prienti o arnodenn ziweza da houzoud iwerzoneg; ma ne dremenoh ket mad hoh iwerzoneg ez oh korballet evid toud an arnodenn. Hag ivez, red eo kaoud iwerzoneg evid mond e-barz ar zervij-stad, bez' e rankoh tremen eun arnodenn iwerzoneg; evid beza eur helenner eil-derez e rankoh tremen eun arnodenn oll-iwerzoneg mez an dra-ze toud n'eo nemed goaperez. Toud ar pez ho-peus da lavared eo « demad » ha « kenavo » ha « mond a ra mad ganen » ha seurt traou en iwerzoneg ha setu penaoz ho-peuz an treh ha ma n'oh ket gouest da ober an dra-ze ez oh korballet. Hag evid toud ar studierien er skol-veur-stad emaoñ an arnodenn dre gomz sod-ze ivez, kea? Bez' ez eo goaperez ha netra ken. Mez ar gouarnamant nevez-mañ e-neus lamet kuit an iwerzoneg dre-red war an digarez, ma ne reer ket iwerzoneg dre-red, e vezo desket dre garantez evitañ. Med ne rafer ket dre garantez... ma kemeroh iwerzoneg ho-peuz daou denn-tremen! talvezoud a ra evid daou denn-tremen; evid ar menegou e talvez evid daou veneg; hag an dra-ze a zo eur farsadenn vraz ivez, ar skoliou-meur ne houzañvint ket an dra-ze evid digemeret an dud...

E – Bez' ho-poa toud an neuz greet gand ar Fianna Fail, sañset e oa unan euz o daou bal evid ar vro, hag an dra-ze e-neus cheñchet krenn doare an dud da zelled ouz an iwerzoneg, kemend a neuz hag a hevier

a zo war-dro. An dud o-deus troet a-grenn eneb dezañ... Ar gouarnamant bremañ, d'an nebeuta, n'eo ket pilpouz.

Me – Ne hellan ober diforh ebed etre Fianna Fail ha Finna Gail.

E – N'eus diforh ebed er politikerezh, mez...

Me – Piou zo er gouarnamant bremañ?

B – Fianna Gail. Mez gouarnamant De Valera eo ar gouarnamant Fianna Fail.

E – Eet int kuit da-vad, bremañ, echu eo ganto.

E – Tamm ebed! (*C'hoarz*).

D – Gwelet e vo, gwelet e vo.

Me – Petra helle ar gouarnamant ousspenn ar pezh e-neus greet?

B – Ma, m'o-defe bet c'hoant e gwirionezh e teufe an iwerzoneg endro, e tefe dezo beza galvet o „TD“ en iwerzoneg, ha beza lakeet an divizour en iwerzoneg hag an dud ne vefent ket bet pell o tond da heul.

Me – „TD“?

B – Kannaded ar gouarnamant. Ma talvez ar boan rei buhez dezañ e talvez ober al labour-gouarnamant en iwerzoneg, a gredan, ha n'eus mod ebed da lakaad an dud da zeski eur yezh nemed dezo rankoud he hompren, ha ma vefe kinniget ar budjed en iwerzoneg, me zo sur-mad ne vefe ket pell ar bobl a-bez o vond da heul. N'emaint nemed evel kannaded ar bobl, setu... N'ouzon ket petra ober... Ni a rank kaoud eun diktatorezh, e gwirionezh, evid digas anezhañ dre red.

Overenn iwerzoneg ebed

Me – C'hwi zo oh ober kaoz diwar-benn ar gouarnamant, hag ez eus eur gouarnamant en Iwerzon hag an zo an Iliz, kea.

B – O! taolit evez euz an Iliz! (*C'hoarz*).

Me – Mad, hag an Iliz 'ta neuze? Daoust hag an Iliz a ra he dever e-keñver ar yezh? Daoust hag an Eskibien a ziviz kenetrezo en iwerzoneg?

B – Nann... Pa oa deuet ar « gwelienn » diwar-benn ar yezhou-pobl e oe greet stad vraz diwar-benn trei an overn en iwerzoneg; en on iliz-ni on-eus c'hweh overn ar mintin, hag e oa eun overn iwerzoneg hepken lakeet da nav eur hanter; bez' e tefe beza bet da unneg eur pe da greisteiz evid talvezoud d'eun niver bennag a dud ablamour an dra-ze eo an overennou ma'z a an dud en Iwerzon; mez: ni on-oa eur beleg a-du gand an iwerzoneg hag an dra-ze a oa ar pella a helle mond; den ebed n'e-noa c'hoant, ar gureed all ne ouient ket lavared an overn en iwerzoneg, o distagadur a oa eur véz ha ma lavarent an overn ne hellent ket ober eur brezegenn en iwerzoneg, setu, nul adarre. Setu p'eo deuet eur beleg all war-lerh – or person a oa marvet, bez' e oa eur renevezour, a-du gand De Valera – ar beleg war-lerh a lezas toud da goueza ha setu-ni n'on-eus overn iwerzoneg ebed.

Me – E Dulenn?

B – O! e Tiperary. En eur helh a gant km n'eus overn iwerzoneg ebed Sur on ez eo ar memez tra dre ar vro.

Me – Gouzoud a rit, n'eus overn vrezoneg ebed nebleh e Breiz; nemed eur vozad renevezourien. Partoud e leh all e vez e galleg. Goude ar pezh a anvit ar « gwelienn » yezh ar bobl; pell amzer a oa lakeet da drei geriou an overn e brezoneg, hag ar galleg a oa deut a-raog, ha toud ar veleien a oa kroget da... Forz penaoz, toud ar veleien, o yezh naturel a oa ar galleg.

B – Re lezireg int evid cheñch, n'o-deus uhelvennad ebed.

Me – Lenn a reent leoriou e galleg, sevel a reent o frezegennou e galleg, trei a reent anezo e brezoneg evid an dud a renk izel.

Daoust hag e vefe posubl e tigouezfe da dud eur barrez goulenn eun overn en iwerzoneg?

Alan Stivell Ballywooney

E – Bez' o-deus greet e Bally Mount, bez' ez eo eur harter euz Dulenn gand labourerien o chom eno, bez' o-deus eur skol oll-iwerzoneg, eur skol kenta-derezh; bez' o-deus eun overn oll-iwerzoneg; bez' e oa red

dezo en em ganna evid kaoud ar skol iwerzoneg.

B – Med, bez' e oa eur seurt Alan Stivell amañ e Ballywooney, marteze ho-peus klevet kaoz anezañ, bez' e oa eun nevez braz er muzik, kemeret e-neus toniou koz ha lakeet eun tres nevez warno hag e-neus krouet eur hiz nevez hag e-neus troet an overn, savet e-neus eun overn evid mond gand ar geriou iwerzoneg, hag an dra-ze e-neus greet eun iñpresion zon. Gweled a rit, bremañ e vez kanet an overn iwerzoneg ha lavaret pedennou an overn e saozneg, chom a reer a-zav evid ar pennadou iwerzoneg. Greet em-eus an dra-ze er skol, hag em-eus klas-ket lakaad an eskob da lavared an overn en iwerzoneg – hag hennez ivez a zo bet o studia er skol-veur stad, hag e tlefe dezañ beza bet gouezet iwerzoneg, mez n'eus ket fellet dezañ beteg ma komprenas e helle he lavared e saozneg. An dra-ze a ziniñ, pa en em gave gand ar „hirie“ hag ar „gloria“ hag an traou-ze e chome a-zav hag e leze al laz-kana da gana en iwerzoneg. Ar pezh, adarre, n'oa ket reiz. Gwelloh e vefe ganen kaoud toud er memez yez; mez bez' ez eo eur gammed war an tu mad, a gav din.

E – Eun dra all a zigouez aliez-kenañ eo, ho-peus eur beleg hag a lavar an overn en iwerzoneg ha pa deu poent ar brezegenn e tro d'ar saozneg.

B – Eun dra all a zo: ar beleg a grog en iwerzoneg fall hag a lavar: « evid an dud na gomprenont ket ahanon e lavar in an dra-ze e saozneg... ». Gevier toud an dra-ze!

E – Me oa o kêzeal gand eur beleg diwar-benn stad an traou, hag e lavare ne veze ket goulennet, ha me a lavare e veze goulennet...

B – Mez ar pezh a zo eo, n'eo ket tud o houlen on-eus ezomm, ezomm on-eus tud o kemered ar penn: ma vefe roet d'an dud e houlenfent.

E – En Iwerzon, kudenn ar veleien o kemered ar penn a zo tost ouz kudenn diktatorelezh ar veleien. Ar veleien a zo bet e penn an traou e-pad re bell amzer.

B – Mad, lakom bremañ ho-pefe eur beleg en eur barrez hag a fell dezañ ren an traou en eun doare siriz, hag e lavarfe e vefe kenteliou en iwerzoneg e-kerz an overn iwerzoneg, lakom d'an abardaez-mañ-

abardaez, ha marteze a-raog an overn er mintin, dond a rafe a-benn; ma vefe eur rener, kompren a rit.

E – Mez bez' e-nefe eur bern kudennou ma ne deufe ket ar goulenn diouz an dud; an dra-ze a zo re heñvel ouz ar beleg en e zoare koz. Kompren a ran e vefe skuiz eur beleg o lavared an overn en iwerzoneg nemed sur-mad e vefe o-deus an dud c'hoant he haoud. Mad, zoken e Cork bremañ, n'ouzon ket ped overn iwerzoneg zo, douetuz unan pe ziou, an dra-ze a zo toud ar pezh a zo ezomm e gwirionez; an Iwerzoniz n'o-deus nemed o-unan da damall. An dud a gêze iwerzoneg e Cork a zo tud euz ar renkadou kreiz, hag o-deus kirri-tan ha ma'z eus eun overn e hellont mond, gouest int da gaoud o hent.

C – Ar memez tra eo e Dulenn.

E – Gweled a rit, eun darn vraz euz an iwerzonegerien e Cork a zo kelennerien ha tud o labourad... tud euz ar renkad kreiz a ran anezo.

B – Intelektualed euz ar renkad kreiz.

E – Euz ar renkad kreiz hepken. Setu perag e soñjan ez eo Bally Mount eur marz a-dra-zur.

B – Renkad labourerien.

E – Bez' emañ an uzin-ze e Dulenn, leh m'emaint o klask deski d'al labourerien eun tamm iwerzoneg... Ar gouarnamant bremañ a lavar, ma fell deoh ober eun dra bennag, ni a zikouro ahanoh 'n eur mod bennag. Bez' ez eus eun doare ober distropoh bremañ, an doare ober a-raog a oa eun tammig re bilpouz; an dra-ze e-neus greet droug dezañ.

Staga trakterien ouz an iwerzoneg

B – Hag eun dra all a zo war-dro an iwerzonegerien hag ar micheriu iwerzoneg, bez' ez eus leun a dud a zo 'barz an IRA, n'eo ket ar Provisional eo, petra eo ar rann all?

E – Ofisial.

B – Bez' ez int tuet da gaoud doareou ober ofisiel, kea; bez' ez eus eun elfenn republikan stag ouz an iwerzoneg ivez.

E – Me a zo bet sod gand an iwerzoneg va buhez-pad, med perag e rank ar politikerezh dond e-barz...

F – Petra lavarez? Daoust hag e heller lezel ar politikerezh er-mêz?

B – Gweled a rit, ni on-eus kazetenn an IRA, al levrenn a vez gwerzet – kaoud a hellfeh anezi e peb leh ma'z eus iwerzonegerien, ha bez' ez int ivez tuet da veza nasionalisted taer, ... ha doare ar gouarnamant da weled an traou n'eo ket re vad kennebeud.

E – Ya, bez' ez int emzaverien, tuet e hellont beza etrezeg politikerezh an tu kleiz pe eun dra bennag evel-se, zoken an « officials » med diêz e vefe lavared ez int nasionalisted. Bez' ez eo ar hiz bremañ, lavared emaoñ oh en em ganna evid Iwerzon...

B – C'hoant he-deus beza europad!

E – Soñjal a ran, eur bern tud, tud hag a zesk iwerzoneg er hêriou, a zo douetuz troet ouz ar politikerezh forz penaoz; ne gomzent ket iwerzoneg er gêr; red eo bet dezo kemered poan d'e zeski. Hag an dramañ a zo digouezet douetuz-braz pa'z int komañset da vond d'ar skolveur, ez int kroget d'e zeski. Komañset da vond amañ hag a-hont ha da zastum eun tamm politikerezh. Pa'z eoh da gemered tregas evid eur yez ez eoh da gemered tregas evid ar politikerezh ivez... Hag ar bern gevier staget ouz an dra-ze: bez' ez eus kantadou a dud o rastellad arhant diwar an iwerzoneg.

Me – Ne gomprenan ket ar pezh ho-peus lavaret aze.

E – O rastellad arhant diwar an iwerzoneg; o hounid arhant diwarmañ.

Me – Diwar an iwerzoneg...

B – Ni zoken a hellfe beza tamallet an dra-ze deom. Ez-kenañ eo – ken diêz eo kaoud labour-hañv bremañ, hini ebed euz ar re zo o kelenn en va skol n'e-neus gallet kaoud, nemedon-me, ablamour emaoñ o kelenn iwerzoneg. Traou evel... tud zo hag a reseo yalhadoù evid kôzeal iwerzoneg, en toleadou bro-Gaeltacht, hag e profitont euz an dra-ze. Yalhadoù evid gwellaad an tiez daoust n'emaint ket e broiou paour.

E – Prenañ trakterien.

C – O sevel, sevel tiez...

Me – Penaoz e hellit staga trakterien ouz an iwerzoneg?

C – Evid gwellaad an douar.

E – Pa brenit eun trakter, ho-pezh kant dre gant pe naonteg ha tri-ugent dre gant euz priz an trakter, hag ar pezh a zo farsuz, e helloh prena eun eil trakter hag ho-pezh ar memez priz hag e helloh kregi gand eun « entreprise » bihan, eur homersant bihan.

B – Toud diwar-goust ar gouarnamant.

Milionou d'an Amerikaned

Me – Hag an uzin a zo amañ?

F – N'ouzon netra diwar-benn an dra-ze.

C – O! an dra-ze zo sikouret gand ar gouarnamant.

E – Toud an uzinou en Iwerzon a zo sikouret gand ar gouarnamant.

C – Bez' ez eus eur yalhad ouspenn.

Me – Mez, daoust hag ez eo sikouret ablamour d'ar yez?

C – Ya, me gav din.

E – Pa zeller ouz an dregantad arhant..., eun uzin euz an Amerik he-deus bet kantadou a vilionou a luriou evid sevel eun uzin amañ, an dud-ze a zo milionered vraz ar béd, hag o-devez eur yalhad a zeg ha tri-ugent dre gant, neket? Setu an nebeud milierou a luriou a jome a zo eet d'an uzinou bihan.

Me – Evid kaoud labour en uzin-ze, daoust hag e rankoh beza iwerzoneger?

E – Ez-ofisiel. Setu eun dra all a reont: digoret o-deus ostaleriou dre

ar vro... toud int eet d'ar zaozneg. Sañset e oant greet evid rei labour da dud vihan a gôzee iwerzoneg evid derhel beo an iwerzoneg; gweloh ganto gounid arhant eged divenn an iwerzoneg. O! brein-kenañ eo stad an traou e-keñver an iwerzoneg!

Me – Me gav ahanoh disfiziuz-kenañ.

B – O! Bez' on disfiziuz penn-da-benn!

E – Ne dalvez da netra beza disfiziuz.

B – Displeg, Sion, Displeg! (*C'hoarz*).

Etre beza gouest da gôzeal, hag ober...

C – Bez' ez eus e gwirionez eun doare yac'hoh e-touez ar vugale yaouank da zelled ouz ar yez. Abaoe ma n'eo ket ken an iwerzoneg da veza kemeret dre red evid an arnodennou, hag ivez abaoe ma'z eo deuet an EEC (Ar Marhad Boutin) da greski ez eus muioh a evez taolet war broiou ha yezou, c'hwi oar, hag an iwerzoneg e-neus kemeret an eil renk. (*Notenn: n'on ket deut a-benn da gomprenn...*)

E – Ma teskoh eur yez, ma teskoh galleg, ho-pezo doujañs brasoh evid an iwerzoneg ma selloh outañ evel eur yez, kea. E-pad re bell amzer ez eus bet kaoz euz ar „gael“: „me zo eur Gael, me gar an iwerzoneg“; bez' e oa gwerzet, bez' e oa moustret war an dud, bez' e oa re a vruderez stag outañ, bremañ e helloh selled outañ euz a belloh. Sellit ouz toud ar broiou en Europa, bez' o-deus oll eur yez dezo o-unan.

B – Ar pezh e-neus lazet an iwerzoneg e oa, e-pad an alouberezh saoz, an dud a felle dezo o-defe o bugale eul lañs mad er vuhez a zeskas saozneg dezo, saozneg fall, gand aon ne hellfent ket kaoud implijou-stad heptañ.

E – Kalz traou a zo da veza lavaret evid divenn an dud... en Iwerzon, gweled a rit, ez eus eur guchennad tud uhel a denn profit diwarnañ; n'int ket chalet gantañ; bez' ho-peus Norvegiz ha Gallaoued, bez' ez eus teir pe beder yez ha n'eus diêzant ebéd; n'eus politikerezh ebéd war o zro, ar yez a zo roet dezo en eun doare naturel. Mez stad an traou en Iwerzon, klask a rit deski iwerzoneg er skol, mond a rit d'ar

gêr, ha marteze ho kerent a zo a-eneb, en eur lavared „ Ha me neuze, me oa mad-kenañ er skol, hag em-eus c'hwitet ablamour d'an iwerzoneg “.

Stourm evitañ?

Me – Mez, kaoud a ra din ne helloh ket keñveria stad ar yezou minorezel gand yezou braz evel ar zaozneg pe ar galleg pe zoken an norveg; ken bihan ez int, gand eun istor ken disheñvel...

E – Gweled a rit, an iwerzoneg a zo kinniget re alliez evel eun dra da stourm evitañ; ma vefe tennet kuit ar stourm, e vefe muioh naturel d'an dud da lavared, „ me gar an iwerzoneg “, neuze e teskoh anezañ m'ho-peus c'hoant.

Me – Med daoust hag e helloh kaoud eun emzalc naturel e-keñver an iwerzoneg en Iwerzon, gand hepken... n'eo ket c'hweh dre gant euz an dud a gomz anezañ?

B – A zo gouest da gôzeal... mez a gôze avad...

E – Bez' ez eo dipituz, gwir, beza o kelenn d'ar vugale er skol beteg ar bachelouriezh hag ez eont kuit hag e lavaront „ gouzoud a rit, me 'm-eus desket iwerzoneg daou vloaz 'zo, hag em-eus ankounac'haet anezañ “ ablamour n'eo ket implijet, ablamour n'eus forz peseurt yez ne reoh ket ganti... Mond a ran da Vro-Hall warhoaz vintin hag ez on ken „merglet“ ha pa oan kroget ablamour n'em-eus ket greet gantañ e-pad eur bloavezh. “ Mond a reont kuit ha n'o-deus den ebéd da gomz gantañ, n'eus êrgel naturel ebéd.

E – Bez' e veze kelennet fall-kenañ ivez!

B – O! gwir! Hag e veze kelennet fall!

E – Desket 'vez d'an dud lenn, ne vez ket desket dezo kôzeal.

B – Hag eun dra all a zo, an dud heb diplom a vez roet an dra-ze dezo da gelenn da vugale ar bloavezh kenta hag an eil, toud ar pezh a zo war-dro ar hlasou kenta, ar memez tra eo evid ar galleg hag eur bern traou all, mez evid an iwerzoneg dreist-oll. Ha kelennerien zo bet deuet d'am haoud gand al leor jedoniezh evid goulenn diganin trei

an iwerzoneg evitañ. Troet em-eus dezañ, heb kompren grik ebed.

Me – Koulskoude me gav din e vez greet kalz muioh evid ar yez amañ eged ma vez greet e Bro-Hall (evid ar brezoneg). Or gouarnamant ne ro sikour ebed.

B – O! ni a reseo arhant digand ar gouarnamant! (*C'hoarz*).

E – Me gav din ez eo poent en Iwerzon da zistenna ar stourm. Red e oa kregi gand ar stourm da genta; me gav din en Iwerzon ez eus bet greet re gand ar stourm ha bremañ e ranker diskregi, tenna ar beh diwarnañ.

Diviz e saozneg bet adskrivet gand **J. Abasq**.

Youenn Brusk

Eun haykou bennag

Barzonegou

Tresadennoù gand an oberour e-unan

Priz: 40 lur.

Oaled Diwan

(Degemeret on-eus ar skrid hir-mañ digand Diwan. Soñjet on-eus e plijfe d'ol lennerien lenn anezañ).

Eur greizenn zevenadurel vrezoneg.

Emañ eil hañvez **Oaled Diwan** Treglonou o paouez echui. Deut eo ar poent da weled penaoz eo bet tremenet an traou, petra 'zo bet ha petra vo gellat ober.

Med da genta eur ger evid an dud n'o-dije ket bet c'hoaz klevet nemeur a ano euz an Oaled. Eur skol brevez e oa gwechall en eur barrezig war ar mêz, harp ouz Arvor goueled Leon. Prenet e oa bremañ pevar bloaz 'zo gand eur gevredigez savet a-ratoz-kaer ha lañset gand **Diwan** ha kempennet eo bet abaoe tamm-ha-tamm gand sikour yalhadou hag ivez labour tud a youl vad.

Evid c'hoaz n'eo ket peurechu an Oaled – kambreier nevez a chom c'hoaz da veza savet – med plas a zo evid tregont den da loja, heb konta an dachenn gampi, hag ar zal-debri a hell degemer eur hant bennag a dud. Abaoe derou 1983 ez eus oh ober war-dro eur renerez-animatourez amzer leun. A-hend-all ivez emañ en Oaled servijou ar gevredigez **Diwan**. Brezoneg a vez neuze ingal gand an dud a vez war-dro, ha Treglonou a zo eur barrez e leh m'emañ beo c'hoaz ar yez enni. War-lerh taoliou esae an hañvez a-raog e oa savet eur huzul da rei lañs da vuhez an Oaled da vad. Neuze e oa bet resisaet paliou an Oaled end-eeun. Setu petra e oant hag ar pezh a zo bet greet d'o zizoud. Deg pal a oa:

- 1) Beza eul leh dizoloi yez ha sevenadur Breiz evid skolidi dre vraz.
- 2) Kinnig d'an oll, koulz yaouankizou ha tud deuet, eur choaz ledan a oberiantizou dudi kaset endro e brezoneg.
- 3) Sikour stumma animatourien ha kelennerien e-keñver yez ha klask dedenna ar muia posubl anezo e-keñver sevenadur Breiz.
- 4) Rei tro d'an oll dud a zo o teski brezoneg a-unan d'hen ober en eun doare efeduz, ne vern pegement a amzer e hellfent gouestla d'an deski na petra ouzefent dija.
- 5) Kas war-raog an enklaskerezh hag ar hroui e brezoneg.

6) Rei da anavezoud herez naturel ha sevenadurel Vreiz hag en-ispisial hini Vro-Leon.

7) Esaad al liammou etre ar minoreleziou ha dreist-oll ar re geltieg o yez.

8) Kinnig d'ar strolladou breizeg eul leh emvod plijuz evid o bodadegou, kendal-hiou, stajou.

9) Aoza abadennoù sevenadurel a beb seurt: sonerez, peziou-c'hoari, filmou.

10) Degemer diouz ar plas a vez an oll, a-unan pe gand o familh, ar re o-defe c'hoant tremen lod euz o vakañsou en eun endro vrezoneg.

N'eo ket bet ankanounac'haet hini ebed euz ar poentou-mañ, med skler eo n'eo ken boulhet al labour hag e chom c'hoaz da vond war-raog eun tamm mad. Gwelom peb poent a-dostoh.

1. Oberiantizou evid skolidi.

Kefridi an oberiantizou-mañ eo rei tro eta da skolidi a zo en o skolioù o teski brezoneg, da gleved ar yez, da zeski muioh ha da gaoud c'hoant d'he implijoud war ar pemdez, en eur ziskouez dezo eo posubl hen ober.

Eur staj evid liseidi a zo bet aozet evid-se da vare Pask (deuet deg anezo). Hag ez eus bet ivez eur hlas-mor evid skolidi derez kenta Diwan e miz even (40 bugel). Spi on-eus e klasko muioh a gelennerien heñcha o skolidi ha renerien o skolioù, skolajou ha liseou, da zond d'an Oaled evid stajou yez ha sevenadur. Posubl eo lakaad er framm anvet e galleg P.A.E.. Deuet 'z eus evel-se dija, evid eur zizunvez, daou rumm skolidi: tud yaouank euz eur skolaj euz Plougastell ha liseidi euz Roazon. War ar poent-mañ e hell ober kalz ar vrezonegerien niveruz a zo skolaerien pe gelennerien, evid rei da anaoud an Oaled hag ar pezh a heller ober e-barz.

2. Vakañsou ha dudi e brezoneg.

Moarvad eo war an dachenn-mañ eo bet pouezet ar muia gand an Oaled. Ha dija ez eus bet greet kalz muioh eged na oa bet biskoaz, koulz dibennou-sizun ha stajou hirrohig, beteg deg pe bemzeg devez evid lod. An dalh war ar poent-mañ n'eo ket kement kavoud monitourien ispisializet hag a oar brezoneg, med ar fed e vefe strizig ar peuri ganeom. Dre vraz e teu ar berzidi euz an Emzao. Dond a ra ivez tud dedennet war ar memez tro gand an danvez studiet ha gand ar fed e vefe e brezoneg. Ha gwir eo eo gwall-efeduz. Eun nebeudig tud a vez beb tro ivez hag a zo dedennet da genta gand an danvez kinniget.

Memez tra eo strizig an niver a dud a hell dond ha red eo dezo ouspenn beza dieub d'ar mare ma vez kinniget ar frapad. Emichañs e vo red en amzer da zond kinnig daou pe dri staj disheñvel er memez mare, rag gand stajou brezoneg war dachennou arbennig, n'om ket prest c'hoaz da leunia an Oaled. (Pez a dalv e vezer koll pe dost e-keñver arnant).

Evid bugale e heller kinnig traou da verher, da fin ar zizun pe en ehan-skol. An dalh eno eo pegen reziz eo ar reolennoù ofisiel war-dro an obererezh evid bugale. Red mad ober diouto, ar pezh n'eo ket eun dra fall forz penaoz, hag e vo lakaet muioh a bouez war ze gand niver ar vugale a zeski brezoneg da vad e skolioù derez kenta o kreski dousig. Se zo kaoz n'eo bet kinniget en hañv-mañ nemed daou frapad evid bugale. Frapadou kalz berroh eged ar pezh a vez kavet a-hend-all, med mond trankilig dezi a felle deom da genta.

Eur hamp evid bugale, e brezoneg penn-da-benn, a zo bet e-pad eur zizunvez e miz gouere gand 16 a vugale. Diwar ar re-mañ, e ouient oll kaozeal brezoneg, nemed unan a gomprenne ha setu toud. Ne veze ket brezoneg hepken etrezo, med kalz muioh eged galleg a veze.

E miz gwengolo ez eus bet tri devez gand pemp a grennarded, brezonegerien o-femp, med an oll êsoh dezo komz galleg. Eno ivez eo bet efeduz a-fed yez.

Da verka ez eus eo bet tremenet mad peb tra hag o-deus bet plijadur ar vugale. Ar fed e ouient koulz lavared oll komz brezoneg êz a-walh a zo kaoz n'eo-deus ket kavet e veze moustret warno re da vrezoneg. Evel just ne veze nemed brezoneg outo gand an oll war o zro, ha brezoneg hepken etre ar vonitourien.

3. Stumma animatourien ha gelennerien.

N'eo ket a-walh bolontez vad ha startijenn. Ma vez c'hoant mond war-raog eo dao ivez stumma gelennerien efedusoh ha monitourien a ouio penaoz lakaad bugale a zo bihannoh o brezoneg eged o galleg da gaoud plijadur o kaozeal brezoneg hag a glasko gwellaad o anaoudegezh anezañ.

Evid monitourien ez eus bet aozet eur staj da vare Pask, leh ma oa deuet 16 a dud, brezonegerien an oll anezo. Emichañs n'eo ket an dud da intent euz bugale e brezoneg a vanko. Menegom ez eus muioh mui ano da aoza eur BAFA (Brevet d'Aptitude aux Fonctions d'Animateur) brezoneger. Evid c'hoaz n'eo ket anezañ, med aozet 'z eus bet dija ganeom da vare kala-goañv, a-gevred gand an UBAPAR (Union Bretonne d'Animation des Pays Ruraux) eur staj BAFA e galleg, « Centre de vacances et culture bretonne » an titl anezañ, kement-mañ dre ma soñjom eo pouezuz lakaad emzall ar muia posubl a dud da cheñch e-keñver or yez hag or sevenadur, ha diwar skwer an animatourien, lakaad re yaouank da domma outo d'o zro.

4. Kelenn ar yez.

Red eo anzav ez eus kalz dilañs gand ar stajou deski ar yez, e-keñver ar pezh a veze greet, lakaom e tro 1975 (pa'z eus bet beteg ugent staj deski ha peurzdeski ar yez en eur bloavezh...). Nag a nerziou foranet ivez pa vez gwelet pegen nebeud a dud a zeu a-benn da zeski ar yez diwar netra. Ped a dud e-touez ar re o-deus kroget da zeski a zo deuet a-benn da kaozeal brezoneg êz gand ar re a gomz anezañ a-viskoaz en eur horn pe gorn euz ar vro vrezoneg?

Evid c'hoaz n'om ket eet pell war an hent-mañ, med menozioù a zo, diwar skwer

broiou evel Kembre e leh ma vez greet stajou d'an daoulamm a bad miz pe zaou, pe en eur voda deskidi beb dibenn-sizun e-pad tri miz. Gwellaad an doareou hag ar binviou kelenn a zo d'ober c'hoaz. E Oaled Diwan e vo bepred lakaet ar pouez war ar yez komzet, dreist-oll p'emañ an Oaled en eur vro vrezoneg a-viskoaz.

Er bloaz-mañ ez eus bet beteg-henn nemed dibennou-sizun hag eur zizunvez staj e-pad an hañv aozet gand Skol an Emsav evid eun ugent bennag a dud.

A-hend-all eo adkroget an Oaled da aoza stajou war ar miz a veze kalzig anezo d'eur poent zo bet ivez. Efeduz-kenañ e oant ha kalz euz ar stourmerien yez en devez hirio a zo bet stummet evel-se ivez. Evid c'hoaz eo bihan an traou ha n'eus bet en hañv-mañ nemed c'hweh den e-pad eur zizunvez. Med muioc'h a helfe beza hag evid tud niverusoh.

5. Sikour an enklaskerez hag ar grouidigez er yez.

Mond war-raog, donnaad ha ledannaad ar sevenadur er yez a rankom. Anad eo n'eo ket plas eun Oaled evel-se ober al labour a raio kement arzour, kement krouer pe skrivagner, med o boda, o brouda, o halonekaad da ober gand ar brezoneg, a zo red. War dachenn an enklaskou, nevezinti ar bloaz-mañ, a oa ar Skol-Veur Hañv Ollvrezoneg. Eun ano braz pa ouezer n'eus bet tremenet nemed tro eun tregont a dud, tra ma'z eus chomet eur pemzeg bennag a-hed ar zizunvez. Med eul leh kelaoui, eskemm skiant-prenet uhel o live eo bet, gand tud deuet euz ken pell ha Bro-Wened pe St-Brieg da gomz dirag ar berzidi.

Studiet eo bet kudennoù ar sevel bugale e brezoneg en devez hirio; eun dachenn difraost a-walh beteg-henn pa chome forzig en o horn an dud a ree. Krog eo bre-mañ koulskoude da veza ensellet don ha dizale e tevio er-miz diellou e-leiz war ar gudenn-mañ a-gevred gand eun diverra euz prezegennoù ar Skol-Veur Hañv. Menegom e oa deuet o bugale end-eeun gand lod euz ar berzidi ha monitourien d'ober war o zro a oa.

Evid c'hoaz n'ouzom ket ha dond a raio ar Skol-Veur Hañv Ollvrezoneg da veza eul leh emgav bloazieg. Med skler eo ez eus plas d'ar mod emvod-se ha tud prest da zond, kerkoulz da ginnig frouez o labour pe zoñjou, ha da zelaou. Ha n'eo ket danvez studi a deufe da vankoud.

War dachenn ar grouidigez arzel ez eus bet daou staj ollvrezoneg. Ar henta anezo gand eiz a dud euz Ar Vro Bagan. An eil a oa anavezoud yez ar sinema gand nao a dud. Renet e oa gand tud a vicher, brezonegerien a-zoare, o-daou euz ar horn-bro, Yann Simon ha Fañch Tañgi, euz « Film et Culture ».

6. Rei da anavezoud on herez.

Ar pez a dalv: rei tro da anavezoud danvez Breiz dre eur horn-douar kreñv mad e bersonelez: Bro-Leon. Mui pe vui e vez greet da vare kement frapad en Oaled. Ha n'eus koulz lavared hini ebed e leh ne vefe digarez pe tro da gaozeal, e brezoneg evel just, gand tud euz ar vro a dro-war-dro, koz ha yaouank, ha da zeski

diganto. Gwir eo kement-mañ diwar-benn ar stajou war ar miz. Gwir e oa da vare an dibenn-sizun studia an natur (12 a berzidi) aozet en nevez-amzer. Gwir adarre diwar-benn ar staj bageal. Kalz muioc'h eged ar stajou bageal ordinal e galleg, endoa hemañ, evel hini warlene, eul liou sevenadurel dibar. Ouspenn deski bageal pe mond gand kanoeou e vez studiet an endro: al laboused-mor, ar pesked, ar bezin, ar gerioù micher. Ha kejet e vez gand tud euz ar vro adarre: pesketaerien ha bezinerien dreist-oll, ken niveruz en Arvor eno.

Anad eo ez eus war ar poent-mañ menozioù forz pegement: levraoueg, sonskridaoueg, skeudennaoueg, hag eo kudenn an arhant a gustum miroud ouzom da vond war-raog ker buan ha ma karfem.

7. Eskemmoù etre minoreleziou.

Plaset mad eo an Oaled, nepellig euz Rosko, e leh e tremen ar peb brasa euz ar Gelled all a deu da Vreiz, evid beza eul leh digemer. Ha red e vo deom beza muioc'h anavezet.

Ar bloaz-mañ adarre evid an eil gwech, ez eus bet eur staj diouyezeg kembraeg-brezoneg. Deuet e oa c'hwezeg a dud, eiz euz beb tu: brezonegerien o teski kembraeg, ha kembraegerien o teski brezoneg.

A-hend-all ez eus tremenet tud euz broiou all, dreist-oll Iwerzoniz ha neuze e talvezo ar boan liesaad an darempredoù a zo dija etre Diwan hag ar hevredigeziou dezo paliou ha doareou heñvel, dreist-oll re Okitania, Katalonia hag Euskadi.

8. Beza eul leh emvod digor d'an Emzao.

Evid c'hoaz eo bet digor Oaled Diwan dreist-oll da ... Ziwan! Bet eo greet eno kendalhou 84 ar hevredad. Greet e vez ivez eno stajou stummadur ar skolaerien. Ar greizenn n'eo ket anavezet a-walh emichañs. Tamm-ha-tamm koulskoude on zaliou a deu da veza implijet gand strolladoù all. Menegi a hellom ez eus bet aozet eno eur staj stummadur diabarz gand ar SGEN-CFDT, hag a zo bet dalhet e brezoneg tost penn-da-benn. Deuet e oa daouzeg kelenner hag eur skolaer euz kement korn euz Akademiez Roazon.

Ar poent 9 eo moarvad an hini a zo chomet goullou beteg-henn – eun abadenn sonerez nemetken e miz eost – hag evid ar poent 10, ma'z eus deuet dija hini-ennoù 'zo da dremen en Oaled eun nebeud deveziou en eur heulia a-wechou lod euz an oberiantizoù a yee endro d'ar mare-ze, anad eo ivez eo red deom bruda an Oaled e-touesk an Emzao evid ma teufe muioc'h-mui a vrezonegerien da Dre-glonou er bloaveziou da zond.

Ar gudenn bouezusa evel just evid Oaled Diwan evel evid peb kreizenn zevenadurel ha muioc'h c'hoaz moarvad pa re honnez gand yez eur bihan-niver, a chom hini an arhant... Dibosubl eo lakaad studierien, familloù, da baea eur priz re uhel evid tremen vakañsoù ha gand ma vefent e brezoneg. Padal, derhel eun ti braz a-ratre, paea an dud a ra war-dro, a goust ker ruz. Labourioù a chom c'hoaz d'ober ha beb tri miz eo red paea mizou an amprest a zo bet greet er « Hredit

Agricole » evid prena an ti, da lavared eo 13.400 lur ha se beteg fin 1987.

Ar re o-dije c'hoant sikour ahanom a hell prena lodennoù euz ar hrevedad Oaled Diwan (100 lur al lodenn) en eur gas chekennoù war ano « SCI Oaled Diwan » da Oaled Diwan, 29214 Treglonoù. A-hend-all e klaskom ivez levriou e brezoneg pe diwar-benn Breiz evid sevel eul levraoueg a-zoare. An oll profou a vo degemeret ganeom gand anaoudegezh vad. Ha fiziñs on-eus e teuio er bloavezioù da zond Oaled Diwan da veza da vad an ti en-deus market kement beteg-henn d'an Emzao brezoneger.

Oaled Diwan.
(98) 04-07-04.

Notennoù a-berz Brud Nevez:

- 1) Lakeet eo bet testenn **Diwan** ganeom e doare-skriva ar skol-veur.
- 2) Evel just, on-eus kaset da Oaled Diwan kement leor bet moulet gand Emgleo Breuz ha Brud Nevez. Ha diwar-vremañ e vo kaset ar gelaouenn beb miz evid netra. Med evid pezh a zell kas arhant, pa n'on-eus ket, ne hellom ket ober!
- 3) Sur, e oa bet savet **Diwan** gand tud hreduz, bremañ zo deg vloaz 'zo, pe ze. Mad e vefe en em zoñjal diwar-benn ar skoliou-ze bet digoret evid « savetei » ar brezoneg. Gortoz a reom pennadoù digand ol lennerien, evid lavared dim ar pezh a zoñjont. Merzet on-eus, er **Skol Vrezoneg** ivez, ez eus nebeutoh a dud o tond d'ar stajou evid deski ar yez. Perag? Penaoz kas a-nevez an traou endro?

A. M.

Planedenn

Kelaouenn oll-vrezoneg
o tond er-mêz peder gwech ar bloaz
80 lur
6, ru Longue Montroulez

ENDRO DA VANTAN ZANT-JEG

Eñvorennou

Deiz va « Zantifikad »

Pesort devez, ma zudou kêz! Goulet 'n-oa an Aotrou Bleaz gand tad unan douz va hamaraded-skol hag a-noa eur charaban dond da gas 'hanom da benn-leh ar hanton. Prest e oam evid an armo-denn. Gouvezed a reem dre an eñvor reoleñnoù an diêsa ar yezadur galleg, ar genioù a gomañse gand ab, ac, ad, af, ag h.a. hag ar re a gemere daou b, daou c pe daou g... Gouvezed a reem deiziadoù brudeta istor on bro hwehkogn – med mann 'bed siwaz douz istor Breiz – ar stêriou, al linennoù hent-houarn evel am-eus laret dija. Gouvezed a reem kanañ, displegañ, lenn, lamped, redeg, lieskementi en toud ar stummou. Chomet e oam bet, abaoe an deiz kentañ 'r bla da studiañ goude ar skol, 'barz « an étude » 'vel ma larem. Greet on-doa toud ar seurtou problemou posubl, skrivet on-doa bet toud ar skrivadennoù bet roet da skrivañ da ganfarded ar zantifikad en toud kantonou Departamant Aodou-an-Hanternoz.

Ya, prest e oam da dond a-benn douz toud an diêsteriou!

Ha setu-ni 'ta, Lommig, Polich, Ifig hag an daou Yann, greet ganim eur zav espres, war hent kêr, abred douz ar beure, gwisket ganim on dillad da zul, ha preparet toud on binvioù: paper brouillad, paper-stoup, kreionou du ha reou liv, reolennoù, goumennoù, teir bluenn « sergent-major », eun doug-pluenn nevez, eur hompas, h.a. Ne vanke mann 'bed. Greet e oa bet an azgwel gand an Ao. Bleaz an deiz kent hag eur wech c'hoaz a-raog kemer hent kêr-benn ar hanton.

Ay er porz-skol, an Ao. Perez hag a oa o hortoz ahanom a deus d'on zaludi ha da bedi ahanon da vond d'e di da verniañ, evel

ma 'n-oa prometet d'am mamm ar wech diwezañ ma oa deut d'ober eun dro da Lann-Jeg.

Eun tamm a-raog seiz eur hanter, eh antreas er porz eun aotrou gwisket kaer, eun èr garv dañ: an enseller, e laras dim an Ao. Bleas. D'ar memez momed, eun dañvad kollet gantañ e hent pe eet kuit douz al laz-di hag a oa tost ahane, ah antreas ivez er porz en eur vegeliad ha toud ar skolidi hag o mistri-skol da hoarzin. Med an enseller a reas zin d'an oll da devel hag o selled ouz ar vugale bodet dirag doriou ar hlasou, e laras ar setañs-mañ n'am-eus ket ankouaet 'nei abaoe: « Ar maout-mañ a vo d'an hini kentañ douz ar hanton, emberr d'abardaez. » Ne oan ket war zoñjal, d'an eur-ze, e teufe ar maout ganin, da lared eo ar plas kentañ, rag an dañvad, argaset gand unan euz ar skolaerien a guitaas ken prim ha ma oa deut 'barz ar porz-skol.

An Ao. Perez a bintas war ar bazenn uhellañ dirag dor ar hlas-kreiz, hag a-vouez uhel evid bezañ klevet mad gand toud ar ganfarded, e komañsas da helven ar skolidi, pep hini d'e dro, hervez o renk lizerennegel. Ha setu-nim 'barz ar hlas, mud ha sioul, o krenañ eun tammig, on divreh kroazet war an daol, o chilaou gand ar brasañ evez erbedou daou vestr-skol karget da gas an traou endro.

« Diwallit mad, klevet a rit, eme 'n hini bihannañ, da reiñ eun taol zell d'adskrid hoh amezeg... Divennet eo! An hini a vo tapet a vo skoet er-mêz, dre urz an Ao. enseller ha n'o ken droad da vond da hadklask e zantifikad a-raog daou 'la pe dri...»

Den ne fiñve o klevet an Aotrou o hedatañ an divennou.

« Divennet eo ivez, klevet mad a rit, du-hont e traoñ ar hlas, divennet eo kad paperou, kartennoù pe taolennou lieskementi, war an daol, dindan ho paper-stoup, ha memez, klevet a rit mad, 'n ho kodellou... An hini a-nije unan douz ar paperou-ze gantañ, zo pedet da vond dustu d'hen pozañ amañ, war ar buro.

« Ha bremañ, eme egile hag a oa chomet mud beteg aze, kemerit ar follennou a zo bet lakeet dirakoh war an daol ha chilaouit c'hoaz gand evez pezh ah an da lared deoh.»

Hag eñ da ziskleriañ dim, dre ar munud, peleh skrivañ on hano war ar bajenn gentañ, on numero, hanv ar skol, publik pe prevez, penaoz plegañ ha pekañ an talbenn... Den ne lare ger ebed. Krenañ a ree va doug-pluenn e va dorn dehou... ne veze klevet nemed mouez heglev ar skolaer o tistagañ goustad ha kreñv e hourhemennou.

Ar boelladenn gentañ a oa eun displegadur e galleg: « Displegit dim eur vojenn ho-peus disket 'nei er skol. » Displega a ris hini Yann-Gouer hag e vugale. Med ne oan ket gwell awenet. Kemeret am-oa memez tra eun tamm asurañs pa deuas ar momed d'ober ar skrivadenn. Ne gavis ket 'nei gwell-diêz. Ne ris nemed eun hanter-fazi, a laras din goude ar skolaer. Ay oa ar momed da vond da gemer an èr. Ha nim d'ar porz-skol da ziskui-zañ on spered ha da debri eun tamm bara pe eur wastell pe div da hadkemer nerz ha kalon. An Ao. Bleas a oa o hortoz ahanom.

—« Kontant oh? » emezañ.

—« O, ya, Aotrou, ne oa ket diêz an traou, » eme Polich.

—« Penaoz 'teus skrivet « pigeon ramier », eme Ifig.

—« Ma feiz, lakeet 'm-eus eun „r“ da „ramier“.

—« O!O!O! 'me Yann... n'eus „r“ ebed e fin ar ger-ze. Me am-eus lakeet eun „accent aigu“, neketa, Ao. Bleas? »

An Ao. Bleas a chomas mud. Losken a ree ahanom da gomz hag ouz hon hlevet e houeze dija niver on faziou... Med ne oa ket ar momed da digalonekaad ahanom. Ar hontroul memez an hini oa.

Eur hwitelladenn skiltruz ha nim o vond arre da labourad. Daou problem da diskoulmañ... Krog e oam da lieskementi ha da geid-rannañ pa'h antreas er hlas eun aotrou bihan, ront ha teñv, eur chadenn aour o kouezañ douz korn kleiz e lunedou e godell vihan e borpant, eur vouchidig war beg e hroñj, stignet e-barz eun espes hopelan hag a diskenne war e votou-ler: An Ao. Yann-Jeg, m'èr Lann-Jeg, kuzulier jeneral ar hanton, « dileuriad kantonal » da lared eo karget gand an Akademiezh da daol pled ouz skoliou e barrouz. Pedet e oa bet 'vel just gand an Enseller da gemer perz e strollad-touidi an amodenn. An daou skolaer e zaludas gand kalz a zoujañs ha setu an Aotrou Dileuriad o vond hag o tond 'barz ar hlas, etre ar bankou. Pa'h ayas 'n em hichenn, war ar bank diwezañ, tost d'an nor, e taolas eur zell ouz va hadskrid-

nèt am-oa dija skrivet warnañ diskoulm ar problem kentañ. Hag an Aotrou o pozañ e viz war eul linenn heb lared ger ebed. Krenañ a reen... ha 'n em houll a reen hag-eñ n'em-oa ket greet eur fazi bennag. Trefuet e oan gand ar biz daonet-ze, biz an Ao. Yann-Jeg. Ha me da hadkomañs kentañ... Med kaer em-oa kentañ ha hadkentañ ne gaven fazi ebed ha ne chañchis netra, evruzamant evidon. Zur mad, e-noa an Aotrou Mèr-Dileuniad-Kuzulier Jeneral, daoust dañ da gad lunedou aour war beg e fri, lennet a-dreuz pezh am-oa skrivet rag ne zofjan ket e-nije bet c'hoant da douellañ ahanon, eñ hag a oa mèt va farrouz, ha fier douz e skol hag e skolidi, hervez pezh a lare pa deue da renti vizit dim, eur wech ar bla. Med bet am-oa bet aon, kredit ahanon...

Echu va beurevez labour, e kavis an Ao. Perez o hortoz ahanon 'barz ar porz-skol.

—« Mond a ra mad an traou ganit, Lommig? 'meañ. Zur mad 'to eur mañsion, mad, da nebeutañ, ha mat'se, mad-tre. Gwelet vo 'vid an abardaez. Dem bremañ da debri mem ha bez dizoursi, paotrig. Mad eo ar jeu. Kontant on douzit.»

Ha fier Lommig o vond da debri friko, deiz e zantifikad, ti pennrener skol veur ar penn-leh.

Goude mem, e komañsas an arnodenn-dre-gomz. Ne oan tamm abafet ebed goude pezh a-noa laret din an Ao. Perez. Lenn a ris evel eur mestr-skol. « Mad-tre » eme an arnodenner, eur pezh den barbustelleg. Displegañ a ris heb fazi ebed unan douz ar pemp mojenn choazet ganin 'vid ma zantifikad ha kanañ a ris « On rente de l'Eglise » ken kreñv ken a grene mogerioù ar hlas, eme an Ao. Bleas ha va mamm deredet d'am chilaou ouz toull-dor ar hlas.

Aon a-walh em-oa diouz an embregerezh-korv, daoust da gentelioù kaporal an 48ved R.I. Ne oan ket gwell-lest, d'an amzer-ze, med an daou vestr-skol karget d'arnodennañ ahanon n'o-doa ket eun êr striz. Yaouankoh e oant evid an aotrounez all. Komz ha c'hoarzin a reent gand ar ganfarded.

Ay va zro ha hini ma hamarad Polich, an distrujer neizioù:

—« Gouvezed a ret galompad, 'mechañs,» eme unan douz an aotrounez.

—« O! ya, » 'me Polich.

—« Gwelet 'vo, » 'me ar skolaer. « Lemit ho porpant ha 'n em renkit 'dreñv d'al linenn-mañ. Eh an da gontañ beteg tri. Tro ar porz, en eur dremen 'dreñv d'ar gwez-kistin, ho-po d'ober. Prest oh? Eun! daou, tri, kit!»

Ha Polich ha me da redeg endro d'ar porz, kalonekaet gand on hamaraded. 'Vel just, Polich ah ayas da gentañ, pell dirakon... Falla amodenn va zantifikad... Med pesort fell deoh, n'heller ket bezañ an hini kentañ dre oll.

Echu oa an traou. N'on-doa ken nemed gortoz e vefe embannet hanoioù al loreidi. Tamm-ha-tamm eh aye tud douz dre oll 'barz ar porz-skol, tadou ha mammou diredet douz parrouzioù ar hanton; tud all ha n'o-doa ket bugale o tremen o zantifikad med deut da zevel o fri ha moarvad da weled piou a vije rasket... ha neuze bugale-skol ar penn-leh deut da hoari 'barz ar porz. Gortoz a reem, bodet endro d'an Ao. Bleas ha d'on zud, dihabask ha nehèt dre ma trem'ne an amzer.

Eur whitelladenn, hag an Ao. Perez, 'n e zav war ar bazenn uhellañ dirag dor ar hlas-kreiz, a bedas ahanom d'en em vodañ dirakañ ha surtoud da chom sioul keit ha ma vije an Enseller oh embann hanoioù al loreidi.

An Enseller a gemeras eur haier braz:

—« Setu amañ, 'meañ, hanoioù ar re a zo resevet, hervez o renk: Le Moraer Guillaume, école de Lann-Jeg, mention „très bien“. Ier du canton. Toutes mes félicitations.»

Deut e oa 'ta ar maout ganin, med ziwaz dañvad ar beure prometet gand an enseller a oa retornet d'al laz-di ha marteze didammet dija.

Toud an dud a oa laouen endro din: va mamm da gentañ 'vel just, va breur, an I. Kogan, lorhusoh evid biskoaz, an Ao. Bleas hag a-noa an hini kentañ douz ar hanton. Pesort enor evitañ! An Ao. Perez hag e Itron. Ha setu-ni pedet adarre gante da vond di gand toud va hamaraded rag, ankouaet am-eus hen lared, e oam toud resevet — da lidañ ar berz-mad, rag d'an Ao. Perez, an dra zo zur, e oa dleet al lodenn vrasañ douz al lore.

Trem'net am-eus bet liez amodenn abaoe hag ordinal eh on bet renket e-touez ar re gentañ pa ne vijen ket an hini kentañ, med biskoaz n'em-eus bet kement a levnez hag a joa evid an deiz-se.

E Breiz-Izel e zo meur a Zant. Peb parrouz 'n-eus he hini, a-wechou liez hini. Med brasa Zant a oa d'ar houlz-se en on Bro, goude Zant-Erwan, 'vel just, e oa zur mad evel am-eus hen laret dija, Zant-Ifikad, eur « Zant » hag a duore dim, hervez on zud, doriou ar skolajou, al liseou, da lared eo doriou an deskadurez hag ar berz. Hag evid on zud hag evidom, deiz ar « Zantifikad » a oa eun espes gouel-meur. Kemer a reent on skrid-testeni gand doujañs ha pa veze bet sterniet gand amunuzer ar barrouz, e veze istribillet 'uz d'ar chiminal etre delwenn ar Werhez ha hini Zantez Anna Wened.

Paotr Jeg.
(Da veza kendalhet)

Andreo ar Merser

Précis de grammaire bretonne

Dalhet 'z eus bet kont euz an oll rannyezou.
20 lur (250g) evid koumananterien Vrud Nevez.

Istor ar Habili

C'HWEZEGVED PENNAD

Peseurt gwez a gaver er vro-mañ
Al loened doñv, pe loened an ti
Al loened gouez
Al laboused

A-raog komz deoh euz ar gwez a gaver er Habili, va lezit da lavared deoh eur gerig bennag diwar-benn ar winienn pe wezenn rezin a gaver e kement korn 'zo er vro-mañ hag a zo ouspenn unan euz teñzoriou ar vro. Ar rezin er Habili a zo euz ar gwella a hellfer da gaoud evid servich da zebri euz taol; mez pa vez greet gwin gantañ, ar gwin n'eo ket gwall-vad, re deo ez eo, hag e liou a zo divalo, evel liou ar siro greet gand spezad. Ar rezin a vez kavet aho pe dare kentoh pe ziwezatoh hervez ma vez plantet ar gwini er stankennoù, el lehiou gwasket, pe war lein ar menezioù e peleh eo yennoh an amzer. Adaleg ar penn kenta a viz even beteg miz du e weler ar Gabiled o voned e seiz korn an Aljeri evid gwerza o rezin; hag e tizroont endro leiz o godellou a arhant.

E-touez ar gwez a gaver er vro-mañ, e komzin deoh da genta euz ar wezenn olivez. Euz ar wezenn-ze eo e vez tennet ar gwella eoul hanvet eoul-olivez. Mar karfe ar Gabiled labourad gwellohig o olivez eged na reont, mar karfent dreist-oll kemer evid labourad ar frouez-se ar benvijiri er giz nevez a gaver er broiou all e leh eo desketoh ha finnoh an dud, e hellfent ober eoul koulz pe welloh eged an eoul a vez greet e kêr Nice hag er hreisteiz euz ar Frañs. Ar Gabiled a ra muioh a arhant, peadra gand o gwez olivez eged gand o douarou,

n'eus forz pegen talvouduz ez int. Euz frouez an olivez e vez kaset leiz eun niver braz a lestri-mor koulz da Vro-Hall ha d'ar broiou all. An darn-vrasa euz an eoul olivez a brener e Breiz-Izel dindan an hano a eoul-Nice pe euz lehiou all, ne deo nemed eoul euz ar Habili, gwerzet gand marhadourien euz kêr Alje evid beza kaset d'ar hreisteiz euz ar Frañs!... Ar wezenn fiez a zo ivez eur wezenn talvouduz-braz evid tud ar vro-mañ. He frouez, pe vent sehet en heol, a zervich da vago-durez d'an dud; gand eun dornadig e vez gwalhet eun den d'e bred; he deliou a vez roet d'al loened, pa vez eet toud ar plouz!

Ar wezenn dero a zo ivez e renk ar gwez talvoudusa. Ar Gabiled a zebr ar mêz e-kriz, pe c'hoaz, pa fell dezo frikota, e lakont ar mêz da boazad er sukr gand eun nebeud brenn pe blouz draillet munud-hamunud, hag e reont eur seurt kouskous gand an dra-ze. Goude an tamm lip-e-bao-ze e lipont o mourrou; goulskoude n'eo ket gwall-vad, m'hen asur deoh! Bro ar Gabiled, evel ma em-eus hel lavaret er penn-kenta euz va liziri, a zo eur vro leun a veneziou braz uhel, hag a stankennou don ha ledan; evel-se ez eus kalz kemm etre an amzer a ra e goueled ar stankennou ha war lein ar menezioù; pa vez tomm da zevi en eul leh e vez yen da skorna en eul leh all. Abalamour da ze e kaver er vro-mañ, er memez amzer ar gwez na boulzont nemed er broiou yen peurvuia; ar pezh a ra d'ar vro beza ken kaer ha ken pinvidig en he gwez. Er vro-mañ, ouspenn ar gwez fiez, ar gwez olivez hag ar gwez dero-mêz, e kaver c'hoaz gwez dero-spoue, gwez sedr, gwez oulm, gwez gwern, gwez eulah pe eulh, gwez elo pe elv, gwez sikomor, gwez fao, gwez haleg, eun daou pe dri seurt anezo. Beza' z eus ivez gwez frouez, evel gwez avalou, gwez pêr, gwez kerez, gwez prun, gwez alamandez, gwez kraoñ, gwez kelvez, gwez mouar, gwez pivoena, gwez orañjez, gwez avalou-sitroñ, gwez brikez, gwez pechez ha kalz gwez all a ve re hir din o heñvel oll amañ. Beza' z eus c'hoaz kalz brousgwez evel ar balan drêneg, an olivez gouez, ha kalz re all. En eur ger er vro-mañ e kaver, koulz lavared, an oll gwez a gaver er broiou tomm hag er broiou yen.

Er Habili, anevaled an ti a zo ar memez re evel e Breiz-Izel; nemed ar hezeg ne gaver ket er vro-mañ; rag ne vez ket moyenn pignad gand kezeg war lein ar menezioù uhel, na diskenn dre hentchou ken striz ha ken diêz. E-leh kezeg ez eus azenned ha muled. Evel laboused an ti ne weler nemed koulmed, yer, killeien, hag a-wechouigou houldi. E kement ti euz ar vro-mañ ez eus eur hi karget da ziwall an ti; evid e zihaoui deuz e boan, ne gav ket din e vefe roet aliez tamm boued dezañ evid torri e naon, taoliou boutou ne lavaran ket, avad!... Ar

bleizi ne dint ket anavezet dre ar vro-mañ, na weler ket euz o liou, nag euz liou ar hirvi, nag an demmed pe yourhed, pe c'hoaz bijorhed evel ma leverer e Kerne. E-touez an anevaled gouez, ar gwasa a zo da ziwall outo eo eun aneval heñvel ouz eur haz, mez kalz brasoh, tost da vad er memez ment gand an tigr, hag a reer anezañ e galleg *panthère*. Al loen-ze a weler stank a-walh er vro-mañ, hag a zo gwall-griz, gwall-bez, eur gwall-ibil, da sponta! Euz al loened ne weler ket gwall-aliez er vro-mañ. An anevaled-ze o-deveus o douarou war gostezioù menezioù *Djurdjura*, a beleh e tiskennont er stankenn vraz a zo e-keiz etre kêr *Bouira* ha ker *Aumale* pe c'hoaz er stankenn a zo etre kêr *Bordj-Bou-Arreidj* ha kêr *Aumale*. Al loened gouez all a weler er vro-mañ eo an *hyène*, ar chakal (ar re-mañ 'zo heñvel-braz ouz al lern), al lern, ar moh-gouez. Abaoe an dispaherez diweza a zo bet er vro-mañ, ar Gabiled ne hellont mui dougen fuzilli, n'o-deveus ket ar gwir da zougen armou-tan; abaoe, niver euz ar moh-gouez a zo kresket kement ma'z eo red da baotred ar gouarnamant ober an hu eur wech an amzer. War gern menezioù *Djurdjura* e kaver eun niver braz a varmouzien. Ar Gabiled, war ar poent-se, n'emañ ket gwall-bell war-leh tud gouizieg an Europ evel *Litré* ha kalz re all, ar Gabiled a zo leun a zoujañs evid ar marmouzien; o hemer a reont evid tud bet diskiant a-walh gwechall evid revuz en em ober diskibien da Vahomet, tud hag a zo bet laket goude o maro er stad truezuz-se gand Mahomet abalamour d'o dizentidigez.

Er Habili e kaver kalz sebieg; rag ar chase a zo divennet, hag ar re a chase a ra evel chaseourien goz Breiz-Izel gwechall, da lavared eo e yelont d'ar chase o godellou karget a vein, eur penn-baz en o dorn. Evel-se ne vez ket distrujet eur vraz a sebieg; abalamour da ze e weler dre amañ klujiri a-vandennadou; tridi a-vernou; mouilhi a-gantchou; kiohed, draskled, borzerelleked e-leiz; pichoned pe kudoned kant evid dousenn, en eur ger kement labous a gaver e Breiz-Izel a gaver amañ ivez. Mez er Habili e kaver c'hoaz ouspenn an èred pe spaouered-braz, ar skouled, ar guped pe burtuled, ar vranhagned ha kalz labousedigou bihannoh ha ne gaver ket e Breiz-Izel kennebeud. Ar Gabiled a gar kalz ar vranhagn a en em vag euz kig an azenned hag ar chas krevet gand an naon. Abalamour ma en em vag gand kig gagn eo hanvet evel-se: Bran-hagn (*charognard*). Al labous-braz-mañ a gas gantañ ivez oanedigou, gevridigou bihan beo-beuk evid o debri. Mad! ar Gabiled a halv al labous-se o *Marabout*, pe o *beleg*; mar tigouezfe gand unan bennag tizoud al labous-se hag ober droug dezañ, ha pa ve heb soñj, e kredfe e vefe sur da veza daonet.

Yann-Loeiz Normand.
(Da veza kendalhet).

Rentaou-kont.

Rimadellou (evel ma red an dour euz ar feunteun)

Ar peb brasa euz an dud, gwechall, ne ouient na lenn na skriva. Bez' ez eus eun dra koulskoude ha ne hell ket beza tennet diganto. Tud an amzer-ze a ouie komz. Komz en eun doare reiz, mad ha brao. Fentuz ivez, aliez. Eur zouez! Dond a ree ar geriou ganto evel ma red an dour euz ar feunteun. Hag evel an dour o redeg euz ar feunteun e kane hag e tañse ar geriou-ze war o muzellou:

« Per ha Paol? Hini 'bed aneo n'eo bet er skol,
« Ya, med kement azen a zo 'anavez an A diouz an O.»

Evid dezi beza prizet, ar frazenn a ranke beza kaset gand eul lusk mond-dond. D'ar skouarn e ranke plijoud kement ha d'ar spered. Ar maout a yee gand ar bomm-lavar stipet ront o houzoud klota ha rima gand ar poziou a deue a-raog pe war-lerh.

Or rimadellou, piou 'oar, a hell beza bet savet evel-se, e-ser konta kaoz, an eil teod o harpa egile heb goud dare, an daou varvailler o kloza an traou asamblez gand eur pezh mell c'hoarzedenn. Den ebed avad ne glaske beza perhenn warno. Pep hini e-noa droed d'ober ganto hervez e hoant. Astenn anezo pe o berraad, kemma tra pe dra enno e-giz ma kare. Ar re anezo a zo bet dibabet amañ gand **Loeiz Roparz** a dalvez dreist-oll evid ar vugale. Pe d'o luskellad ha d'ober barlennig dezo mar dint bihanig, pe d'o lakaad d'ober anaoudegez tamm-ha-tamm gand ar pezh a zo endro dezo ha d'ober d'o zeod labourad mar dint brasohig, med atao avad evid o derhel drant ha laouen. Lakeet e-neus Loeiz, ouspenn, toniou war ar rimadellou evid dezo beza plijusoh c'hoaz, beza êsoh da zibuna ha da zeski. Toniou a zo ivez, re goz ha re nevez, war ar hanaouennou a vo kavet ouz o heul.

Dibabet eo bet an danvez penn-da-benn e-touez an traou fentusa ha birvidika bet diwanet diwar skiant ha spered ar bobl. N'eo ket war zigarez e koll tud vraz a zo o memor e rankfe ar rummadou nevez hag ar re da zond tremen e-biou d'eun teñzor a zo gantañ atao liou an aour melen pa ouezer c'hweza diwarnañ poultrenn an

ankounah.

Charlez ar Gall.

Rimadellou: eur bladennad rimadellou, gand **Loeiz Roparz**. Bet ken-embannet gand **Skol Uhel ar Vro** hag **Al Leur Nevez**.

Kinkladuriou on arrebeuri hag o sekrejou

Eur bloavezh a-raog e varo e-noa diskouezet din Charles Le Roux tresadennou al leor **Ornementation bretonne** (1). Ne oa ket echu c'hoaz. Chom a ree da beurechui eun nebeud tresadennou, ha dreist-oll da zevel an displegaduriou. Deuet eo Marguerite Le Roux-Paugam, e verh-kaer, a-benn da glokaad e labour, ha setu e hellom sellet, bamet, ouz an tresadennou-ze e-noa lakaet e boan da adkavout war arrebeuri on tadou-koz.

Henchet e oa bet abaoe e yaouankiz gand e dad a labour e Mirdi Kemper. Neuze, dreist-oll goude 1938, Charles Le Roux a lakaas en e zoñj adkavout sekrejou kinkladuriou on arrebeuri evid ma vefent êz da ober a-nevez evid on amunuzerien a-vremañ. Deuet eo a-benn. Adkavet e-neus pik kreiz peb kelh en em vesk al linenou anezo evid ober arabeskou ken luziet ha ken urziet war eun dro.

Gand eur reolenn hag eur hompaz e vezent treset gand micheourien Vro-Leon ha Kerne-Uhel e-doug ar XVIved hag ar XVIIved kantved. E-barz al leor int bet renket euz ar re êsa d'ar re ziêsa. Reou 'zo, memez, a zo bet greet heb reolenn pe gompaz ebed, setu int bet diêz a-walh da adsevel.

Estreged gand an amunuzerien e hello beza implijet al leor-ze: gand ar vugale, a blij kement dezo sevel tresadennou jeometrik.

Skrivet eo bet an displegaduriou e peder yez: galleg, brezoneg, saozneg hag alamaneg. Iskiz a-walh eo ar brezoneg gwechou 'zo. Da skwer, e vez roet da houzoud dim « Genel a reas hemañ e Leuan »! Ma! deut e oa eur paotr da henel eur paotr a oa eñ e-unan! Biskoaz kemend-all!

A. ar M.

(1) Charles Le Roux, **Ornementation bretonne, XVIe et XVIIe siècles**, introduction de Marguerite Le Roux-Paugam. Bet embannet gand **Reflets du Passé**, Nantes.

Teñzor sonerez ar Vretoned

Eur pezh mell leor, embannet eun nebeud miziou 'zo gand **Bodadeg ar Sonerion**, o renta deom 2.365 ton sonerez, a-hed 638 a bajennou dornskrivet ar hlichedou anezo gand ar mestr-soner enklasker m'eo Polig Monjarret.

Eul labour divent, frouez eun daou-ugent vloavezh a zivizou heb paouez hag a abadennoù-seni gand kantadoù ha kantadoù a zonerien hag a ganerien a beb korn ar vro. Savet e-neus Polig roll eur 700 bennag euz ar re o-deus sonet pe kanet dirazañ pe o-deus e henchet daved talabarderien, biniaouerien ha kanerien o hornad. Eur roll diglok avad, pa zo bet tapet toniou gand diazezer B.A.S., meur a wech, e kuz da zonerien a zo, hervez ma kont e-unan...

Kavoud a reer e penn kenta **Toniou Breiz-Izel**, da heul eur hent-skrid splann – skrivet gand Per-Jakez Hélias –, eur studiadenñ ouizieg savet gand an dastumer hag o tigas sklerijenn, n'eo ket hepken war zoareoù ha teknik ar zonerezh-dre-venveg e Breiz-Izel, hogen ive war lerhchennoù arz o pobl ha war an enklaskoù greet kentoh evid re on enklasker.

Chom a ray **Toniou Breiz-Izel** evel ar zavadenñ dibar euz teñzor sonerez ar Vretoned.

A. K.

Polig Monjarret: **Toniou Breiz-Izel. Musique populaire de Basse-Bretagne. Folk Music of Western Brittany.** Embannadurioù Bodadeg ar Sonerion (8, ru Maupertuis, Roazon). – Eul leor keinet 210 x 300 smad.

G.S.: Souezet e vo meur a vrezoneger moarvad pa ne gavint ket eur bajennad bennag e yez ar vro e penn kenta eul leor m'eo e zavez ken breizeg, gand netra ken e yez ar vro nemed titlou ar peuzoll euz an toniou hag eun toulladig poziou 'barz ar raglavar. Ha pa welint eo deut er-mêz eur voulladenñ e saozneg ouspenn an hini e galleg.

Reizadennig: Eur fazi a zo bet greet e dibenn pederved linenn va fennad diwar-benn **Kumunded Europa hag ar yezou bihan**, e niverenn 78 Brud Nevez, pajenn 53: red e vefe bet skriva: « e Palez ar Gumunded, e Bruxelles », e-leh « e Strasbourg ». Ar hollok, an emvod kenta evid kaoud keleier hag eskemm menozioù a-zivoud stad ar yezou « minorezel » en Europa a oa bet aozet e kêr-benn Bro-Beljik ha n'eo ket e Ti braz Kuzul Europa (a dalvez ive evid emvoudoù-meur Parlamant an deg bro). (A.K.)

Lizerou.

Mil bennoz ha trugarez d'an oll dud a ra o spered, o deskadurezh hag o foan evid sevel hag embann ar gelaouenn **Brud Nevez**.

Me 'm-eus atao ar brasa plijadur o lenn anezi. Med allaz, ne 'm-eus ket a-walh a amzer evid lenn ha kemer joa beb niverenn. Setu e houlenñan e vije azaleg bremañ kaset Brud Nevez da Blabenneg.

L.A., Kemper.

Gand an hevelezh plijadur e teuan da adkoumananti evid ar bloaz a zeu. N'am-eus ket kalz tra da rebech ouz doare ha danvez ar gelaouenn, nemed marteze e karjen lenn muioc'h a bennadoù faltazi, daoust ma'z eus dija.

A-hend-all ne hellan nemed gourhemennaoui ahanoh hag heti deoh beb a Nedeleg laouen ha beb a vloavezh mad!

E. G., Kleder.

Kalz a blijadur a gavan o lenn Brud Nevez abaoe eur bloavezh. Setu eur chekenn 80 lur evid eur houmamant all. Trugarez a laran deoh evid al labour a zo greet evid ar brezoneg.

E.M. St Nazer.

Plijuz-tre em-eus kavet lenn diou pe deir niverenn euz Brud Nevez bet prenet ganin ar bloavezh tremenet. 'Vid bloaz em-eus c'hoant koumananti.

A. G., Lanuon.

Ma gourhemennou deoh evid al levrig kaer **Eun haykou bennag** a dalv meuleudi 'leiz ar baner.

Laouen braz on ivez o weloud en niverenn diwezañ ez eus c'hoaz eur strobard all euz envorennou saouruz Pôtr Jeg.

D.K. Roazon.

(Unan euz ol lennerien e-neus merket e oa diêz a-walh gwechou 'zo ober an diforh etre „m“ ha „n“. Siwaz n'hellom cheñch netra. Evel-se ema al lizerennou „Rockwell“ (Sellit da skwer ouz pennad Pôtr Jeg).

Roll al leoriou bet moulet e 1984

Kelaoui

- 1- **Keravel**: Vers une charte des langues régionales et minoritaires en Europe. Réponse pour la langue bretonne à l'enquête de la Conférence permanente des Pouvoirs locaux et régionaux de l'Europe (eil moulladur).
2- **Fañch Broudig**: Langue et littérature bretonnes. Bibliographie: 1973-1982.

Studi ar brezoneg

- 3- **Visant Seite**: Brezoneg beteg penn.
4- **Jules Gros**: Le langage figuré (advoulladur).
5- **Jules Gros**: Le style populaire (advoulladur).
6- **Emile Ernault**: Geriadurig brezoneg-galleg (advoulladur).
7- **Fañch Broudig**: Ar béd o trei.

Danevellou - beajou

- 8- **Ernest ar Barzig**: Buhez ha Faltazi (advoulladur).
9- **Yves Miossec**: Dreist ar mor braz (advoulladur).
10- **Mikael Madeg**: Danevellou gouezeleg a Vro-Skos.
11- **Patrig Gouedig**: Enez Eusa (gand minikasedou).

Barzonegou

- 12- **Per-Jakez Helias**: Ar mên du (advoulladur).
13- **Roperh er Mason**: Chal ha dïchal (advoulladur).
14- **Youenn Brusk**: Eun haykou bennag.

Peziou-c'hoari

- 15- **Per-Jakez Helias**: Isild a-heul (advoulladur).
16- **Jakez Riou**: Momenoe-oe (advoulladur).

Leoriou evid ar vugale

- 17- An houad divalo (Ladybird).
18- An hini barveg (CEL).
19- Heoliou bihan ar mor (CEL).
20- Ar pennou teo (CEL).
21- Ar steredenn-vor (CEL).
22- Ar rozenn hag ar honikl (CEL).
23- Ar pesk-heskenn (CEL).
24- M'on-efe eun ti gand eul liorz (CEL).
25- 'Barz ar stered (CEL).
26- Tadig Nedeleg (CEL).
27- Ar hloun (CEL).
28- Ma Babig (CEL).
29- Oto Uberz (CEL).
30- Or skridou brao (CEL).
31- Laeron ar Zup (CEL).
32- An tropell gwez (CEL).
33- D'ar mammou (CEL).
34- Tituz (CEL).
35- Me garfe beza (CEL).
36- **Madeg-Rolland**: Margodig an dour eienenn.
37- **A. an Diuzet**: Yannig (advoulladur).

Kanaouennou

- 38- **Tregeriz**: Kanaouennou evid ar re yaouank (gand eur vinikase-tenn).

Agenda 1985 Brud Nevez

Priz: 15 lur
(da houlenn war-eeun digand Brud Nevez)

Leoriou ar miz

Jakez Riou

Nomenoe-oe !

– pemved moulladur –

Priz: 40 lur

Per-Jakez Helias

Ar Mên du

– eil moulladur –
skrid brezoneg nemetken

Priz: 40 lur

Jules Gros

Le Trésor du Breton Parlé
Tome III

Le style populaire

– eil moulladur –
661 bajenn

Priz: 150 lur

Alan an Diuzet

Yannig

Skeudennou
gand
Langleiz

– eil moulladur –

Priz: 30 lur

Mikael Madeg

Margodig an dour eienenn

Hervez eur gontadenn bobl dastumet digand
Jean-Louis Rolland
bet renket evid ar vugale
Tresadennoù gand **Joël-Jim Sevellec**

Priz: 30 lur

Danevellou a vro-Skos

bet lakaet euz ar gouezeleg e brezoneg
gand

Mikael Madeg

**Kavet e vez Brud Nevez hag ol leoriou
da breina e ti:**

Ar Béd Keltieg, ru ar roue Grallon, Kemper.
Ar Béd Keltieg, plasenn Guérin, Brest.
Gwalarn, rue des Chapeliers, Lanuon.
Kornog, 22, ru ar Vur, Montroulez.
Breiz, 17, ru Penhoet, Roazon.
Breiz, 10, rue du Maine, Pariz.

Prenit ol leoriou e ti ar varhadourien leoriou

Ma n'o-deus ket anezo, lavarit dezo goulenn anezo digand:

Diffusion Breiz
29135 Speied

Kristian BRISSON

AR REDER-MOR

Romant pe varzoneg?
Deoh da varn!

20 lur (150g)

